

East-Gwengolo/août-septembre 2015 • niv. 404 • 6,5€

b remañ

Breizh hag ar bed



Skingomz

brezhoneg leizh ho tivskouarn

hag ivez > Idle No More > Gast! > Yan' Dargent > Ar Fiselerezh

bremañ

Breizh hag ar bed

**Ha klok eo ho tastumad?
Preñt an niverennoù a vank deoc'h!**

Kasit deomp roll an niverennoù a fell deoc'h preñañ.
Lod eus niverennoù Bremañ zo bet peurwerzhet c'hoazh: kadarnaet e vo ha chom a ra skouerennoù pe get eus an niverennoù goulnet ganeoc'h.

Bremañ, 25 straed Pierre Martin, 35000 Roazhon bremañ@skolanemsav.com



➔ 2€ ar skouerenn

➔ 20€ an dastumad ur bloavezh
(11 niverenn, betek an niv. 398)



#brezhoneg

bep eil miz / 6 niverenn ar bloaz


le magazine pour progresser en breton

Ur gelaouenn divyezhek brezhoneg-galleg a-razozh evit an deskidi

➔ 30€ ar bloaz ➔ 2,5€ ar miz

koumanant bloaz 30€ | estrenvro 42€ | skoazell adalek 42€

- ➔ **Koumanant dre chekenn** war anv Skol an Emsav
- ➔ **Koumanant dre Internet** e lec'hienn Skol an Emsav
Paeañ enlinenn a c'hallit ober gant ho kartenn-vank (PayPal)
www.skolanemsav.bzh
- ➔ **Koumanant dre lamadenn vizek**
 ordinal 2,5€ | estrenvro 3,5€ | skoazell adalek 3,5€
Kasit ho lavsennoù-bank (DAB) gant ar sammad da lemel dibabet
➔ An urzh-paeañ SEPA da sinañ a vo kaset gant Skol an Emsav deoc'h!



Koumanantit
evit ar wech kentañ
hag ho po
ar prof-mañ!

Levrioù all zo da breñañ
e lec'hienn Coop Breizh
www.coop-breizh.fr

Talvezout a ra ar prof-mañ
evit ar c'houmanant kentañ
preñt, feun heolken, betek ma
vo echu ar stokoù pe betek
an 31 a viz Kerzu 2016.

Da gas da: **#brezhoneg**, 25 straed Pierre Martin, 35000 Roazhon
Chekennoc'h war anv Skol an Emsav 02 99 38 79 83 | brezhoneg@skolanemsav.com | www.skolanemsav.bzh

Bremañ

Kelaouenn vrezhonek savet e 1980
hag embannet gant Skol an Emsav
Magazine en langue bretonne
fondé en 1980 et édité par Skol an Emsav

25 straed Pierre Martin, 35000 Roazhon
Pgz.: 02 99 38 75 83
Postal: bremañ@skolanemsav.com
Lec'hienn internet: www.skolanemsav.bzh

Rener an embann
Directeur de publication
Guy Allain

Bodad skridoazañ
Comité de rédaction
Gwernvael Jâquel, Samuel Julien,
Fulup Lannuzel, Tangi Lagavre

O deus kemeret perzh en niverenn-mañ:
Diriñtour: Pierre Desjardins, Jerom Botyjaer,
Maelle Bramoulé, Nil Caouissin,
Stefan Carpentier, Anna an Duigou,
Padrig Féroc, Gwernvael Jâquel,
Samuel Julien, Anna Kere,
Valérie Kervellec, Fulup Lannuzel,
Tangi Lagavre, Paskal Tabuteau,
Maksim Touzé

Sekretouriezh-skridoazañ, pajennaazañ
Secrétariat de rédaction, PAO
Milio Latimier

Sekretouriezh, kontouriezh, bruderezh
Secrétariat, comptabilité, publicité
Sandrin Gauvain

Skeudenn ar bajenn 1
Image de une
© Stokkete

Moullañ
Impression
Printcorp www.printcorp.fr
6 ball Clémenceau, 22000 Saint-Brieg

Koumanant
Abonnement
Koumanant-bloaz: 30€
abonnement d'un an: 39€
koumanant-maez ar C'hwec'hkorn: 49€
abonnement hors Hexagone: 49€
koumanant skoazell: adalek 50€
abonnement soutien: à partir de 50€
koumanant@skolanemsav.com

**Paeañ a rit ho koumanant
dre chekenn?**

Sellit ouzhañ an niverenn a-us
d'ho c'h ar war ar follenn-gas.
M'eo an niverenn 404, kasit ur
chekenn 39€ war anv Skol an
Emsav evit bezañ peursur da
gaout an niverenn a zeu.

CPPAP 1116 G 88732
Evit kaout an niverenn CPPAP eo bet troet
e galleg ar manegoù ret er bajenn-mañ ha
war ar golo.



Teulad > P.17-21
**Skingomz,
brezhoneg leizh ho tivskouarn**

ar gelaouenn

- 4 Soñj & disoñj
- Un dibab keleier embannet e Bremañ gwechall.
- 5 Pennad-stur / kronikenn
Gerij ar skipailh hag A-c'hin d'ar blev.
- 30 Lizehoù & kemennadennoù
Ur galv gant XDSK, harpañ 7seizh.info, Tavarn SAE...

ar bed

- 6-7 Bremañ er bed
Keleier diwar-benn pobloù na yezhoù eus ar bed.
- 8-9 Anavezout ar bed
Chariter arkeologel Corent en Arvern.
- 10-11 Broioù & pobloù
Al luskad "No More" savet gant hantroidi Kanada.
- 12-13 Bremañ e Breizh
Labourerien ampozonet Nurbis-Triskalia, Deump De'...
- 14-15 Blevañ e Breizh
Kinnig ar gweridigzh Gasti gant un ezel, Maelle.
- 16 Blevañ e brezhoneg
Pennad-kaz gant Stéphanie Stoll, prezidantez Diwan.

Breizh

- 17 Radio Kerne e Douarnenez
Labour skipailh Radio Kerne e-kerzh Gouez ar Filmoù.
- 18-19 Bredañ ha Skignañ
Pennad-kaz gant Anna Jaouen, Karget a zornen.
- 20 Hentoù nevez
Gwechall e veze bodet radio ha tele... Hag en dazorn?
- 21 Teknologezhoù nevez
Seizad a reer a radio maoc'h-mui dre Internet.
- 22-23 Levrioù arzoù embann
Yan' Dargent, livour Les Lavandières de la Nuit
- 24 Sonebrezh sinema, c'hoarhoù
Ar feukter e-barzh filmoù Quentin Tarantino.
- 25 Sonebrezh sinema, c'hoarhoù
Ar Feukterez, kevredigzh feist ar Fisel e Roazhonenn.
- 26-27 Sportoù & yec'hed
Ober sport zo ya'h. Ober re a c'hall bezañ nozuz avat.
- 28 Petra ober, petra gweañ?
Diskouezadegoù, festoù ha leskvaodoù da ziv.
- 29 Boued
Pizza gant eog ha kourjez ha bara Kruaz.

Tredadenn ganeoc'h?



Tresit!

Dre an gwechad c'hoarhoù, ur sell
all war red ar cheleier. Soñjal a ra da
lazh skipailh Bremañ e veze un dra vat
kaout tredadennoù er gelaouenn
adare. Ingal e vezent kavet gwechall
diwar greioù Tudu, Malo Louarn ha
reou all. Neus bet kaset tredadenñ
ebet da Vremañ en tad-mañ, swiataz.
Tresañ a blij deoc'h? Awenet e vezit
gant ar cheleier, ar vuhez a vremañ,
ar pezh a weit bemdez en-dro deoc'h?
Kasit ho tredadennoù kelaouañ hag e
tibamp lod da embann er bajenn 3.

Er rann "Soñj & disoni" ec'h embannomp ur sell war ar pezh a gaved da lenn e pajennoù ar gelaouenn *Bremañ* dek, ugent ha tregont vloaz zo.

bremañ



30 vloaz zo > Gwengolo 1985 > niv. 48

Fulor unvaniezh studieren Vreizh

Ur sindikad studieren oberiant er bloavezhioù 1980 e oa Unvaniezh Studieren Vreizh (USV). Er pennad e *Bremañ* niv. 48 e tispleg ar sindikad emañ e fulor evit meur a abeg, ar Chapes brezhoneg da gentañ (Capes krouet e 1985) "adkemenn a ra d'an dud n'eus bet studiet betek-hen nemet raktes ur Chapes "mesk" brezhoneg mui ul danvez all [...]. Ret e vefe sklaeraat an traoù: daoust hag en deus doujet Kuzul ar Vinstred ouzh goulnn grañs ar Vretoned e vefe kelennet a yezh er skolioù, ha krouet ur Chapes gwirion [...]" E 2015 e oa bet tapet ar Chapes brezhoneg gwirion gant tri den, evit tri fost. Ne oa ket laouen USV gant ar panelloù-hent kennebeut: "diskredik e chom Unvaniezh Studieren Vreizh: evel ur bern strolladoù breizhek all, n'omp ket laouen gant prezegennoù hepken, ha pa vefe reoù an aotrou Lang, ha gortoz a reomp resisadurioù ha dreist-holl oberoù". Ministr ar sevenadur e oa Jack Lang d'ar c'houlz-se ha lakaet en doa sevel Kuzul Broadel Yezhoù ha Sevenadurioù Frañs. Hervez USV ne oa ar c'huzul-se nemet "un tamm choariell rak-dilennadek". Evit klozañ e kas USV da soñj "ar pep reañ evit ar brezhoneg: Brezhoneg yezh ofisiel e Breizh, brezhoneg e kement skol e Breizh, un Deug hag ur Chapes brezhonek gwirion, brezhoneg er selled-ha-kleved dre krouiñ serjioù skinwel ha skingomz brezhonek hag adunvidigezh Breizh". E 1989 e oa bet teuzet USV gant "Klub Emil Masson" ha ganet e oa bet Dazont, ar sindikad studieren brudet.

20 vloaz zo > Gwengolo 1995 > niv. 168

E Festival ar filmoù e Douarnenez: Skos, he sevenadur, he stourm politikel


E 1995 e oa bet pedet Skos e gouel ar filmoù e Douarnenez hag arabat disoñjal ne oa Parلمان ebet eno d'ar mare-se. E Gwengolo 1997 e oa bet aozet ur referendom evit goulnn gant Skosiz o ali diwar-benn muioc'h a emrenerezh: 75% eus ar voterien o doa mouezhiet "ya". Daou vloaz abretoc'h, e Douarnenez, e oa en em gavet a-du Roseanna Cunningham ha Georges Kerevan, daou gannad eus an SNP evit lavaret "e vo dieub Bro-Skos, pe war an hent da vezañ dieub, a-benn pemzek vloaz". Gwir eo e oa bet kollet ar referendom diwar-benn dizalc'hiezh Bro-Skos e Gwengolo 2014, met war an hent da vezañ dieub emañ ar vroad-se hep mar na marteze!



10 vloaz zo > Gwengolo 2005 > niv. 287

Dazont Dizale

Reuz a oa e Breizh e 2005 abalamour d'ur breutaer eus Los Angeles: Perry Mason! E 2005 e veze skignet *Perry Mason* e brezhoneg war TV Breizh ha dilennidi zo e Kuzul-rannvro Breizh ne blije ket dezho ar mennozh reiñ ar chanted evit advouezhiañ oberoù krouet ha produet e Hollywood. Samuel Julien, rener Dizale, a tispleg d'ar c'houlz-se: "nechamant hor boa e-keñver divizoù ar Chuzul-rannvro [...] an tabut etre an dilennidi e oa an nechuñs evidomp. Ne oa respont ebet ganto e-keñver ar skaozelloù ar chanted. Diles eo bet an traoù e-pad tri miz. Ne oa den er studio ken. Ankeniet e oa an holl [...]". A-benn ar fin e oa bet asantet gant Kuzul-rannvro Breizh reiñ 172 855 € d'ar gevredigezh evit advouezhiañ filmoù. E 2004, pa oa aet Jean-Yves an Drian da brezidant ar c'huzul-rannvro e oa bet lakaet Yann-Bêr Thomin dileuriad evit ar brezhoneg ha Sylvie Robert e penn ar sevenadur...



Amañ ar radio, ar Vretoned a gomz ouzh ar Vretoned

E Breizh e teu ar c'helioù-meur da vezañ brasoc'h-brasañ. Tremen a reer kalz a amzer stanket war an hentoù, e goudor ar c'hirri. Petra ober enno? Lenn ar posteloù o tibunañ war skramm ur poellgomzer, divinout skeud un dremm e stumm ur goumoulenn bennak, debriñ ur sandwich... Allesoc'h koulskoude e selaouer abadennoù radio. Dibab a c'haller e-touez kinnigoù liesseurt: sonerezh jazz, klasel, elektro, atersadennoù ha divizoù diwar-benn ar c'heleier, termoù sevenadurel, prederouriel pe gouestiet d'ar c'hiz. N'eus nemet un dra a chom difiniv... ar yezh. Ne c'haller ket dibab ur radio e brezhoneg n'eus forzh pelec'h e Breizh. Aesoc'h eo selaou ar BBC e Sant-Maloù zoken, pa vez brav an amzer. Ret eo d'ar vrezhonegerien zo o chom e Breizh-Uhel, pellgargañ an abadennoù dre ar genrouedad. Gallout a ra bezañ ur skoll-hent evit ar re n'int ket en o bleud gant an teknologiezh. Bez' ez eus binvioù nevez aes d'ober ganto evelkent, hag a zegas diskoulmoù pleustrek evit tremen eus bed ar gwagennoù d'ar bed niverel. Tamma-tamma e steuz an harzoù etre ar skinwel, ar skingomz, ar poellgomz hag an urzhiaer. Eskemm a raio ar c'hirri-tan gant an eurierioù pe an tiez a-benn nebeut. Kavout a raio hor yezh he flas e mare ar *global media* peogwir eo kadarn youl ar stourmerien.



Poellgomzer, eurier, dizalc'her, luc'hskoudernevez, pellwel ha radio war un dro... Ha brezhoneg e-barzh?

Kronikenn A-c'hin d'ar bleu gant Paskal Tabuteau

Diwar Sklêrijenn ha gouloù


Deskadurezh, Deskamant, Deshoni? Mat da vezañ kaset pelloc'h, ma reont perzh gwellañ ur sevenadur pe ur gredenn. Oplited Aleksandros, menez-h Iwerzhon ha mardelid an Oriant o devez bet atav muioc'h eget nerzh o brec'h, komzoù o Feiz pe nevezitioù da skignañ e-mesk o amezien, Radio, Tele, Skolioù, setu ar re hor sikur, hiziv, war o lerc'h, da hadañ kelennadurezhioù liesseurt e-mesk ar yaouankizoù a vremañ ha gant internet eo e vo desket hiviziken latin pe henc'hresianeg pa ne vo mui graet kalz en hor skolioù... Levezon deskadurezh an ail war sevenadur egile? Frouezhus eo bet atav evit an holl! Petra 'vije bet eus Roma hep Aten? Petra 'vije bet eus Gallia-Comata hep Roma? Hogen ar Romaned o-unan, panevet ar Gelted, a gendalc'he d'em walc'hiñ disoavan ha da lakaat ar gwinn en amforennoù... Nemet, ur wech bennak, setu ar C'hermaned o truilhañ, ar Vosenn o redek bro, an Islam o kemer a greñv war Impalaeriezh Bizantion ha paradoaou! Kollet gant ar Gornôgiz ac'hanomp pep anaoudegezh eus sevenadur Hellaz ha Roma. Kollet ha peurgolet, gouez da istorourien zo hag a embann ouzhpenn ez eo a-drugarez d'an Arabed hor bije gallet adperc'hennañ an hêrezh-se. Istorourien all avat ne savont tamm ebet a-du gant o c'henseurted. Addegas a reont da soñj dimp e oa bet chomet bev regaz hengoun Homeros ha Platon dindan ludu an ankounac'h e oa a-drugarez d'ar gristenien e oa, pa gendalc'has ar re-se da studiñ ha da ziskrivañ oberoù-holl Helleniz, evite da vezañ dindan ar Vuzulmaned. Goulnn a reont ma ne vefe ket disoñjet kennebeut perzh Konstantinopolis en trevel mirerezh-se. Diskouez a reont splann ivez e oa chomet bev-mat oberoù an Henamzer en Abatioù Europa, e Breizh paneveken, ma veze dastumet ha studiet skridoù Aris-



Akropol Aten.

tot e Menez-Mikael-ar-Mor, hag e kement romant kourtez skizma d'ar mare-se, e veze anv eus Hektor, Helena, Achilleus... Pell a vezañ bet disoñjet a-grenn neuze gant Europiz e oa hêrezh Aten ha n'eo ket a-drugarez da Vuzulmaned "al Andalous" eo hon eus he adperc'hennet e-tro ar 15th kantved. Neuze? Koñchennoù Gwrac'hed kozh eo Mojenn Aour Kornôgiz patavek bet divleupet gant Arabed fur ha gouizie? Ya, war a seblant... Nemet, arabat eo teuler an trebez war-lerc'h ar billig memes tra, trawalc'h 'vo adreñ da Atena-Partenoz ha da Gaerzar ar pezh a aparchant dezhe ha lavaret n'he deus ket bet tre-ha-tre ezhomm hon Azginnivezh a sklêrijenn ar Sav-Heol pa n'hor boa ket e gwirionez kollet nep Gouloù da vat. Sklêrijenn ha Gouloù? Setu a ra diouer a-grenn, marteze, da dud all, kostez Pariz, pa fell dezhe reiñ plas ar c'hil, er skolioù, d'al latin ha d'an henc'hresianeg. "Beati pauperes spiritu" emezont... ha gwazh a-se da levezon Kelennadurezh Filozofed Skol Aten.

El Niño: efedoù lies




A-hed ar bloaz e kamin gwrez gorre ar morioù. Brasoc'h e vez ar c'hemm-se da vare Nedeleg e Meurvor Habask. C'hwezhañ a ra an avelioù-kuliv en tu kontrol. Bountet e vez ar morredennoù tomm war-zu ar Stadoù-Unanet hag ar yenn war-zu Aostralia. Lesanvet eo an anadenn-se "El Niño", da lâret eo "Mabig Jezuz."

Merzet o deus al loareloù amzer ez eo uhel gwrez ar mor e bloaz-mañ; daou zerez ouzhpenn eget kustum. Embannet o deus ar jederioù e vo kreffv prantad El Niño adalek Nedeleg 2015 betek nevez-zamzer 2016. Anat e vo e efedoù war aodoù Meurvor Habask: sec'h or ha douz, Ewelkent, n'int ket gwarezet a-enep ar bedeladur. Prenañ a reer danveziou un tamm e pep lec'h er bed evit magañ al loened en antoù. Ma'z eo kriz ar sec'h or pe an dic'hlanou e kresko priz an danveziou. Soja, maiz, gwinizh... Liammet eo emdroadur o frizoù an eil re ouzh ar re all. Gwelaet e vo ar memes disoc'h e marc'had ar pesked. Ne vez ket ar pesked en hevelep tachennoù pa gemm gwrez ar mor. Heuliañ a reont ar morredennou yenn e-lec'h ma vez fonnusoc'h ar boued. Pa vezont bouñtet war-zu Aostralia e teu da vezañ startoc'h evit pesketaeren Suamerika da leuniañ o rouedoù. Arabat eo disojañ ez eo El Niño un digarez eus ar re wellañ evit lakaat an danveziou da ganañ gant ar brokerez, daoust ma'z eo ingal ar c'hementadoù war ar marc'had bepred. Evit ma chomfe sioul an hin e c'hallfed kas ur bedenn da Vabig Jezuz...

Gouzout ur yezh vroadel: ur redi evit kargidi Bolivia

Abaoe Eost 2015 e rank kargidi Stad Bolivia bezañ gouest da vestroniañ unan eus ar 36 yezh a vez komzet er vro-se. Divizet eo bet kement-se gant ar Prezidant Evo Morales evit kenderc'hel da zidrevadeniñ ar vro. E-touesk ar 36 yezh n'eus nemet teir a vez mestroniet gant ouzhpenn 100 000 yezher: kechuag (2,7 milion), aymareg (2,2 milion), ha gwaranieg (116 000 den). Daou vil daou c'hant hanter-kant skrid-testeni a oa bet roet d'ar c'hargidi aet betek penn o c'hentel aymareg. Gwiriet-strizh e vezo ha gwa d'ar re na vint ket gouest da sevel frazennoù en unan eus ar yezhoù: dic'hopret e vint. Seblantout a ra an holl drabu-se bezañ brav evit yezhoù broadel Bolivia. Pezh zo, ma seller a-dostoc'h e komprenere abalamour da betra n'eo ket laouen an holl gant an dra-se. A-benn ar fin, evit kaout ar skrid-testeni ez eo trawalc'h kaout 25 urvezh kentel ha bezañ gouest da saludiñ, da gimidiñ hag anavezout ur ger bennak a sevenidig. N'eo ket marv mil den... Diasoc'h da lonkañ c'hoazh, prezegenn Evo Morales evit displegañ abegoù ha pelliou al lezenn nevez-se a oa bet dalc'het e kastilianeg penn-da-benn, war-bouez ur frazenn en aymareg e penn kentañ hag e dibenn e brezegenn.



Adkavout a raiio menez uhelañ Norzhamerika e anv orin

N'eo ket gwall vrudet menez McKinley, hini uhelañ Norzhamerika eo koulskoude gant 6168 metr uhelder. E 1896 e oa bet roet anv William McKinley d'ar menez-se en enor da brezidant ar Stadoù-Unanet etre 1897 ha 1901. Pezh zo evit an dud a o chom e-kichen ar menez, an Indianed Koyukon, e oa bet graet anezhañ Denali ("an hini uhel") abaoe pell zo. Ewel-luet e kendalc'h ar re zo o chom eno d'ober Denali eus ar menez-se daoust d'an anv ofisiel bezañ menez McKinley. A-benn ar fin e oa bet divizet gant an "Ti-Gwenn", e miz Eost 2015, lakaat anv orin ar menez da anv ofisiel: Denali. Seblantout a ra bezañ dister an istor-se met n'eo ket: n'haller bezañ nemet laouen pa vez reizhet seurt direizhderioù.

Daou vilion a dud e straedoù Barcelona evit dizalc'hiezh Katalonia



Klevet ho peus kaoz eus an 11 a viz Gwengolo e c'heleier gallek moarvat, pa oa bet lidet an Diada, gouel Broadel Katalonia. Souezhet oc'h bet marteze gant gerioù zo er c'heleier-se (war France Inter, *Le Monde*, *Libération*, *Le Figaro*...); ar "rannvro" a fell dezhi bezañ dizalc'h, pe ar "parlament rannvro", ur "rannvro binvidik" ha kement zo. N'eo ket sur eo bet komprenet gant kazetennerien Pariz an diforc'h etre broad, bro, rannvro... Pa lenner en ur gazetenn ken sirius ha *Le Monde*, d'an 12 a viz Gwengolo, e vo dalc'het un "dilennadeg rannvro" d'ar 27 a viz Gwengolo, ez eus peadra d'en em c'houlemañ ha ne reont ket a-ratozh chom hep reñ anv ofisiel an dilennadeg-se: *Eleccions al Parlament de Catalunya de 2015*. Gwashoc'h zo, e-barzh *Le Figaro* e c'hall lenn d'an 11 a viz Gwengolo: "Hiziv, deiz a ouel rannvro e Katalonia". Pouezus eo an termennoù a implij ar gazetennierien c'hall ha ma vez graet ur "rannvro" ganto eus Katalonia n'eo ket diabet.

Un dra zo sur, aet e oa etre 1,5 ha 2 vilion a dud e Barcelona (tost d'un dredrenn eus ar boblañs) evit diskouez o youl da vezañ dizalc'h ha da sevel ur republik. Hervez sontadegoù ar mare-mañ emañ 80% eus ar boblañs a-du gant an *dret a decidir* ("ar gwir da zivizout"). D'ar 27 e vo ret d'ar Gatañed ar Su dibab o c'hannadeg. Chañsoù bras zo ez afe ar maout gant ar strollad *Junts pel Si* ("asambles evit ar ya") adarre. Kant pemp sez ha tregont zo e Parlament Katalonia hag evit bremañ ez eus 62 zizalc'hour eno (muñiver keffverel).

Inizi Faero: 19 sez diwar 33 gant strolladoù dizalc'hour



D'ar 1st a viz Gwengolo e oa bet dalc'het dilennadeg Parlament Inizi Faero. Stag eo an inizi-se ouzh rouantelezh Danmark met emren int abaoe 1948. Bez' ez eus meur a strollad dizalc'hour eno. Naontek sez diwar 33 sez ar Parlament zo aet gant dizalc'hourien. Aet eo ar maout en dilennadeg-se gant ar Strollad Demokrat Sokial (nann-dizalc'hour) gant seizh sez (25,1% eus ar mouezhoù). An eil strollad eo ar Strollad Republikan (tu kleiz, dizalc'hour) gant seizh sez (20% eus ar mouezhoù). Daouzek sez all zo aet gant strolladoù dizalc'hour bihanoc'h. Hir e vo an hent c'hoazh betek an dizalc'hiezh dre ma n'emañ ket a-du c'hoazh an holl strolladoù war ar penaoz hag ar pegoulz e vefe disklêriet ar Stad nevez.



Ras yr iaith 2016

Ur c'hleved pegeus. Setu penaos e c'haller termenñ ar pezh a c'hoarvez en Euskadi abaoe 1980 hag e Breizh abaoe 2008. Merzet eo bet an azoneù kentañ e Kembre e 2014. Tud zo, kozh ha yegouank, zo aet gwelet o redek evit harpañ o yezh... Bodet e oa izili poellgor Ras yr iaith da vare Eisteddfod Genedlaethol 2016. Embannet o deus an aozerien o locho ar redadeg eus Bangor d'ar 6 a viz Gouere hag a vo lidet an dibenn e Llandello d'an 8 a viz Gouere. Niverus e vo an taolioù intrudu lec'h a-hed an hent. Ar skolioù hag ar c'hreizezennou sevenadurel a vo war ar renk evit kinnig abadennoù plijus d'ar rederien ha d'ar arvesterien. Ar re a fello dezho dougen ar vach-eilañ e-pad ur c'hilometer a rorio £50. Hervez Sión Jobbins, prezidant ar gevredigezh Ras yr iaith, ez eo ar redadeg un arouez evit ar youl, ar c'hoant hag an nerzh-kalon a vez kavet e-touez Kembreiz evit ma vefe gwelet o yezh war un hent yaek ha yaehus.

Georjia: dav d'ar minorelezhioù broadel gouzout jeorjieg

Sed petra zo bet displeget nevez zo gant David Ousoupsashvili, dileuriad Parlament Georjia. Hervezañ e c'haller lakaat ar pleustr kement doare zo evit tizhout ar pal-se: kastizoù, teloukasti, poanloù. Pouchaset e vo servijou ha stummadurioù evit deskiñ ar yezh vroadel. Lavaret en deus splann e ranke pep keodedour deskiñ ar yezh vroadel evit bezañ enframmet ar gevredigezh. Disklêriet en deus ivez avat, e ranke dileuridi ar minorelezhioù doujañ d'o yezhoù ha d'o sevenadurioù. Minorelezh broadel brasañ Georjia eo an Azerbaidjanez (6,5% eus ar boblañs). Evit echuiñ en deus displeget: "ma rankan en em stallañ en ur vro bennak gant ma familh em bo daou bal: derc'hel ma yezh din-ma ha deskiñ yezh poblañs ar vro-se."



Chanter arkeologel Corent Ur sell nevez war Istor ar C'halianed



Tachenn-labour arkeologel Corent, war ddiarnentiñ ur savadur galian. Ha roman er dalenn ganitañ. © Colleyes, 09/2010

Ur menez-tan kozh eo Corent. Evel an holl menezioù-tan en Arvern eo sioulaet ha n'eus ket bet eus dislonkadennoù mein devet ennañ abaoe kalzig a amzer, met entanus eo deuet da vezañ en ur mod all: e bed an arkeologourien hag an istorourien e c'hoarvez bremañ ur strofisadenn skiantel abalamour d'ar pezh a veze adkavet bep hañv e douar du ar menez.

e-kreiz Arvern emañ Corent, a-us da drañnienn an Allier, war un hent hag a oa talvoudus bezañ mestr warnañ en Henamzer, ken pouezus e oa evit ar c'henwerzh gant broioù ar Mor Kreizdouar. Abred a-walch, er Ragistor zoken, e voe tud o chom hag o labourat war lein ar menez-se. Ur gêr e teuas da vezañ, hag unan vras, abalamour da c'halloud he mistri pe da binvidigezh he marchadourien. En amzer ar C'halianed en em astenne war kant devezh-arat marteze. Goude aloubadeg ar Romaned e chomas savadurioù, met war a seblant ne oa ket kement a annezidi hag en amzer dizalc'hidigezh an Arverned. Er Grennamzer Uhel ez eas ar gêr da get evit abegoù a chom amsklaer.

UR GÊR GOZH MANET DIWAR WEL E-PAD 1 500 VLOAZ

Adalek an 19th kantved e krogas ar Stad c'hall da vezañ dedennet gant istor ar C'halianed. Klask a raed kompren pelec'h e oa al lec'hioù meneget gant Julius Caesar. Derou ar chanterioù arkeologel bras a oa e Frañs ha tabutoù a save evit gouzout pelec'h e oa Gergovia, Alesia, Bibracte...

Kumun Merdogne, nepell diouzh Corent, a voe adanvet Gergovia Met chom a rae kuzh ar gêr a gouske dindan douar Corent.

UN OPPIDOM PINVIDIK


Koulskoude ne oa ket divrud al lech. Gant al labourerien-douar e veze dastumet pezhioù arkeologel war lein ar menez ur wech an amzer hag er bloavezhioù 1980 ha 1990 e voe graet sontadegoù en douar evit gouzout hag-efi e vefe talvoudus klask pelloc'h. N'eo nemet e penn kentañ ar bloavezhioù 2000 e krogas da vat ar furchadennoù kentañ.

Ne voe ket dipitet an arkeologourien pa grogjont da furchal dindan ar parkeier ed. Ouzhpenn roudoù tier a voe kavet: ur gêr frammet-mat a oa, enni un templ, ur blasenn vras, stallioù, ur savadur stumm un teatr gresian dezhañ hag a c'hallfe bezañ bet implijet evit emvodou politikel, ha straedoù eeun aozet hervez ur steuñv. Sklaer eo e oa ul lech galloudus hag a veze implijet evit bodañ tud. Palloù resis an emvodou bras-se n'int ket anat, met gallout a reer soñjal e vezent stag ouzh ar relijion hag ouzh ar politikerezh dreist-holl.

CORENT, KÊR-BENN AN ARVERNED?

Mil vrudet eo Gergovia abalamour d'an emgann a c'hoarvezas e-kerzh brezel Julius Caesar a-enep ar C'halianed. N'emañ ket bet a-du an holl skiantourien atav evit ober eus Gergovia/Merdogne tachenn trech Verkingetorix war lu Julius Caesar. Adkavet ez eus bet roudoù eus an emgann-se tro-war-dro a-benn ar fin. Chom a reer avat en entremar daoust da se: mard eur sur, pe dost, e oa bet eus an emgann kontet gant Julius Caesar el lech-se, eo kalz diasuroc'h e oa kêr-benn an Arverned eus oppidom Gergovia. N'eus ket bet adkavet eno roudoù savadurioù ken pinvidik ha reoù Corent. Ha ma vefe faziet Caesar? Evit arkeologourien zo, rener chanter Corent en o zouez, e c'hallfe bezañ kêr-benn gozh an Arverned war menez Corent just a-walch.

Ouzhpenn Caesar a skrivas diwar-benn sevenadur ar C'halianed ha pobl an Arverned. Testennoù all zo bet miret ha studiet e vezont hiziv c'hoazh. Kaoz a zo eus an Arverned en *Douaroniezh* skrivet gant Strabon e fin ar c'hentañ kantved a-raok Jezuz-Krist. Hervezañ e vefe Nemossos kêr-benn an Arverned a-raok amzer an



Ur valenn arem.



Darbod ur valenn. Gergovia. © B. B. S. O.



Ur c'hav mogeriet eus an elivet kantved goude Jezuz-Krist. © B. B. S. O.

impalaer Aogust (adal -27 betek 14). Aze e krog an ditour da heñchañ an arkeologourien etrezek lein menez Corent.

E penn kentañ o doa labourer war roudoù an templ savet e kreiz ar gêr. Eno e voe adkavet klopennoù loened, klopennoù lern en o zouez, ha pezhioù moneiz skeudenn ul louarn war pep hini. An elfennoù-se a ro da soñjal e oa al lern loened a bouez e Corent. Un arouez a-dra-sur, arouez piv pe petra avat?

Hervez an istorour Poseidonios e rene ur roue war an Arverned, e kreiz an elivet kantved a-raok Jezuz-Krist, Luernios e anv. Mare e ren a seblant bezañ mare sevel lodennoù kentañ templ Corent ivez. Gouzout a reer eo ar ger *luernios* orin ar ger 'louarn' er yezhoù keltiek a vremañ...

Hervez Poseidonios c'hoazh e veze dalchet festoù bras-spontus gant ar roue Luernios, lonket gwin ha debret kig a-leizh. Tro-dro d'ar blasenn dirak templ Corent ez eus bet kavet gant an arkeologourien kalz a dammoù anforennoù ha kalz a eskern loened. Klotañ a ra mat ar roudoù hag ar pezhioù arkeologel dizoloet e Corent gant skeudenn lech galloud rouaned an Arverned lezet deomp gant istorourien an Henamzer.

KÉRIOÙ, KÉRIOÙ-PENN, MEURGÉRIOÙ... A-RAOK ALOUBADEG JULIUS CAESAR

Koulskoude eo re abred evit cheñch anv Corent hag envel anezhi Nemossos, evel ma voe graet eus Merdogne gant an anv Gergovia. Tost emañ an div gêr an el ouzh eben ha kregiñ a reer da zizoleiñ kêriadennigoù galian etrezo, war vord an Allier. Un trede zo arkeologourien o labourat enni: Gondole, nepell diouzh an div all. Soñjal a ra da lod eo re eeun krediñ e oa ur gêr-benn nemetek. Ha ma vefe bet an tri oppidom eus traoñienn an Allier, Gergovia, Gondole ha Corent, ur "meurgêr" trifennek anvet Nemossos? Da C'hergovia ar brezel, da Gergov ar relijion hag ar galloud politikel ha da Chondole ar c'henwerzh?

AR C'HALIANED HA SEVENADUR KÊR

Kenderchel a raio an dael (ha taer e c'hall bezañ) e-pad bloavezhioù ha bloavezhioù. Diskoachet ez eus bet lodennoù bihan hepken eus an tri oppidom hag eus ar c'hêriadennigoù savet en-dro dezho. Cheñchet eo bet penn-da-benn doare an

istorourien da welet Istor ar C'halianed, avat. Gwechall e veze graet anezho tud a-ziv ar maez ha na vevent ket e kêrioù, pe reoù bihan ha digempenn hepken. Dre chanterioù nevez evel hini Corent e ouzomp n'oa ket gortozet bezañ dindan veli ar Romaned evit sevel kêrioù bras, poblet hag urzhiet. N'eo ket bet degaset sevenadur kêr gant an aloubourien, cheñchet al lec'hioù hag an doareoù sevel tiez ne lavaran ket.

Gouzout hiroc'h

Ditour resisoc'h, skeudennoù ha rentaou-kont pep koulzad furc'hall a gaver e lec'hienn ar gaverdigazh LUERN a ra war-dro ar chanter:

www.luern.fr

Daou deulfilm savet gant David Geoffroy a c'haller sellet ivez: *Les Festins de Luern* (2007, Court-jus Production, 52 min) ha *Gergovie, archéologie d'une bataille* (2010, Court-jus Production, 67 min).

www.court-jus.com

Idle No More ul luskad nevez e stourm pobloù kentañ Kanada



Devere Stratford © © 4.0 Swinormshed eus luskad Idle No More war ganoù o stourm a-enep staladurioù Shell en Elliott Bay, e Stad Washington (Stadoù-Unanet Amerika).

"Idle No More a c'halv an holl bobloù da gemer perzh en un dispac'h habask, evit enoriñ damani ar pobloù kentañ hag evit gwareziñ an douar hag an dour". Kement-mañ a lenner e lec'hienn ofisiel Idle No More ("dioberiantiz biken ken") evit displegañ pal an emsav habask-se, ul luskad gwregelour e metoù henvroidi Kanada.

Krouet eo bet Idle No More (INM) e fin 2012 evel ur respont d'al lezenn C-45 divizet gant gouarnamant Stephen Harper, kentañ ministr Kanada. N'eo ket an emsav habask nemetañ diazezet gant merched ar pobloù kentañ. Dibaoe ar bloavezhioù 1970 e vez stourmet gant henvroadezed a-enep an trevadennerezh ha bell an ezhech. Koulskoude ez eo eñ en deus ar muiañ a levezon hiziv war ar gevredigezh keodedel.

EVIT AR MERCHED HA GANTE, EVIT AR BOBL HA GANTI

Kroget o deus trioù-kaer INM gant labour peder maouez eus Kanada ar Chornôg: Nina Wilson, Sylvia McAdam, Jessica Gordon ha Sheelah McLean. Fellout a rae dezhe diskuliañ labour gouarnamant mirour Stephen Harper e-keñver an hentoù bageal, el lezenn C-45. Ar skog war an endro, war an holl annezidi (henvroidi anezhe pe get), a oa pouezus evite. Se zo kaoz o deus klasket izili INM kelaouiñ an dud diwar-benn se.

ENNOZHIOÙ MOD KOZH HA SAOTRUS AR PENNOÙ-BRAS: "PADUEZIT!"

Pa oa bet kinniget al lezenn-se d'ar boblañs e seblante bezañ bet graet evit aesaat ar bageal war hentoù kengevread Kanada. Ar pezh zo en doa disklêriet ar gouarnamant e oa gwarez an endro ur skoilh evit an hollad lezennoù a zifenne. Un digarez all evit skañvaat reolennoù gwareziñ an natur adarre. Embannet e oa bet e oa diaes diorren raktresoù greantel e-giz eoulsanloù a dreuzfe ar stêrioù abalamour d'al lezennoù-se.

Ar gouarnamant Harper ne oa ket ar wech kentañ dezhañ sevel a-enep ar reolennoù-se: aotreet en doa mengleuzerezh t'raezh terdouarek! dibaoe un nebeud bloavezhioù. Kas an tireoul produet en Alberta d'ar Stadoù-Unanet: a zeu da vezañ ur sorchenn evite.

Estreget ar pal-se he doa al lezenn nevez: kemmhañ framm al lezenn gozh a reolle rannadur an douar e takadoù an henvroidi. Ganti al lezenn nevez e vo aesoc'h gwerzhañ douaroù a oa sañset bezañ miret e dalch ar galloudoù publik.

ENDRO SKRIJUS HENVROIDI ZO DILEZET GANT OTTAWA

Gwiriou ar pobloù kentañ n'int ket bet doujet ur wech ouzhpenn. Bezañ a re a oa ar wech-se evit merched zo. Abalamour da se e oa degouezhet ur vaouez all, Theresa Spence, en istor. E penn an Attawapiskat emañ Theresa Spence, graet ganti un harz-debriñ d'an 11 a viz Kerzu 2012. Savet he deus he mouezh a-enep doare gouarnamant Ottawa e-keñver diaesterioù he fobl. Un enkadenn a-fet savadur ha lojeiz a oa oñch ober he freuz en takad abaoe un dek vloaz bennak. Setu m'he doa he fobl savet goulennoù diwar-benn an archant roet gant ar gouarnamant hag ar mod ma veze meret.

Stourm Theresa Spence en deus sklêrijennet Idle No More en ur mod-all. Mard oa start a-wechoù displegañ abegoù fetis an emsavadeg d'an dud a-raok he harz-debriñ, e oa kalz aesoc'h goude. Pleustrek e oa an traoù, e darempred gant buhez an dud. Buhez an henvroidi da gentañ ha, tamm-ha-tamm, muioc'h-mui a dud eus an diavaez o deus kemeret perzh e manifestadegoù hag obererezhioù INM.



"Didrevadenniñ" livet ouz ar vogez e Sault Ste. Marie (Ontario).



Dibunadeg e straedoù Victoria, e miz Kerzu 2012.


DISENTIR KEODEDEL HA FLASH-MOB: BINVIOÙ AN AMZER-VREMAÑ

Kudenn gentañ ul luskad e-giz Idle No More, estreget ar stourm gwregelour evel-just, a zo lakaat ar stourm da vezañ brudet-mat er vro a-bezh, hep feulster, hep kounnar. Manifestadegoù a bep seurt a oa bet savet e penn kentañ an emsavadeg da-gelver *The National Day of Action*: un devezh aozet gante evit diskouez enebiezh ar pobloù kentañ ouzh al lezenn C-45.

Ouzhpenn ar manifestadegoù e vanke obererezhioù splann evit diskouez ar stourm d'ar boblañs. Neuze o doa kroget da aozañ obererezhioù nevez awenet gant spered an disidentigezh keodedel.

Traoù simpl hag efedus evel *flash-mobs* [engavioù prim] ma korolle an dud dañsoù hengounel e kreizennoù-kenwerzh. Seurt obererezhioù zo deuet da vezañ arouezius eus al luskad. Ha traoù luzietoc'h hag un tamm pelloc'h diouzh al lezenn evel stankañ hentioù-houarn dre vodañ un nebeud tud warne.

Sylvia McAdam, daoust dezhi bezañ sam-



Tud Idle No More o lidañ kentañ bloavezh o luskad (e 2013) en ur stal vras e Vancouver.

met seurt traoù war he chouk, he deus aliet an dud d'ober gant manifestadegoù hag obererezhioù dousoc'h hag habask ar muiañ ar gwellañ.

DIAES DA GAZETENNERIEN ZO KOMPREN TRO-SPERED AR STOURMERIEN

Kazetennerien ha politikerien a bep seurt, kentoc'h mirourien pe tud eus an tu-dehoù o deus klasket lakaat ul liv politikel war Idle No More. Diaes eo d'ur gouarnamant, neus forzh pehini e vefe, daremprediñ ul luskad "dibenn" ha dibollikel. *Indigenism*? a oa bet graet eus al luskad gant meur a gelaouenner kentoc'h ouzh an tu kleiz.

Ret eo kompren eo gwriennet stourm Idle No More el luskadoù didrevadenniñ an 20th kantved. Evit gwir int bet kaset muioc'h gant tud an tu kleiz abalamour

d'an temoù bezañ heñvel. N'eo ket tamm ebet danvez preder pennañ stourmerien an emsavadeg-se koulskoude.

Mard eo difenn an douar, an dour, gwiriou ar pobloù kentañ un dra eus an tu kleiz ha mard eo enebit ouzh granterezh saotrus an t'raezh terdouarek hag an eoulsan¹ Keystone XL un dra eus an tu kleiz, mar-teze emaint en tu-se. Ne ra forzh evite.

Gwareziñ an natur, diorren ar c'hhevredigezhioù henvroidi, digeriñ o sevenadurioù eo palioù kentañ ha pouezusañ Idle No More. Bezañ anavezet gant ur gouarnamant n'eo ket.

Pierre Beauvendre

1. terdouarek: douar ter-du ennañ
2. lazet hon eus an termen saoznek orin indigenism
3. eoulsan(où) (t.): tuellenn a vent vras a vez kaset traoù drezi eus an eil lec'h d'egile
Evit gouzout hiroc'h: www.idlenomore.ca

David a-enep Goliath: stourm hir ezfredidi Nutréa-Triskalia

Laurent, Stéphane, Pascal ha Claude; ar pevar goprad-mañ a oa bet ampoezonet gant un diastuzer difennet e 2009 hag e 2010. Stourm a reont abaoe pemp bloaz a-enep o implijer kozh, Nutréa, isembregerezh unan eus ar stalioù pennañ a vez kavet e Breizh war dachenn an agroboued, Triskalia.



Tolpadeg dirak Lez-vern Sant-Brieg evit harpañ ar vicherourien ampoezonet, e miz Mezheven 2013.

Kregiñ a ra an istor-mañ e 2009, e kumun Plouizi, en Aodoù-an-Arvor: amprevaned a vez kavet en 20000 tonennad ed, berniet e silolioù ar stal Nutréa, un isembregerezh eus ar gevoulour labour-douar Eoloys d'ar c'houlz-se ha dindan beli Triskalia hiziv. Urzh a vez roet d'ar vicherourien da lakaat war an ed un diastuzer dañjerus-tre ha difennet e Frañs, an Nuvan Total. Netra na vez roet dezho d'an em wareziñ, e mod ebet. Buan-tre e krog an trubuilhoù yec'hed ganto: poan benn, koll gwad, dislonkañ... Padout a ralo e-pad bloaz. Laurent Guillou ha Stéphane Rouxel zo tapet da gentañ gant un allergiezh vras ouzh ar produioù kimiek. Sevel a reont klemm evit ma vefe anavezet ar c'hleved-se evel ur c'hleved labour. Ha n'eo ket echu: den ne oar pelec'h eo aet kuit an 20000 tonennad ed, bet louzaouet gant an Nuvan Total: roet eo bet d'ar chatal, a dra sur... Peadra da spontañ ar vevezerien!

Penaos kaeñ ouzh unan eus brasañ embregerezhioù ar vro?

Da gentañ, ne oule ket re ar c'hopridi penaos ha gant piv bezañ sikouret. A-benn ar fin e tiviz Serge Le Quéau, ezel eus ar sindikad *Solidaires* ha dilennet er c'h-KASER¹, obar war-dro an afer-se. Daoust d'o stourm ha d'o youl eo bet

start-tre ar jeu betek-henn. Rak stourm ouzh Triskalia, unan eus brasañ stalioù Breizh, a c'hall bezañ arvarus: an emvod-kelaouiñ kentañ a oa bet aozet e Pariz e 2011, ken riskius ma oa komz eus se er vro.

Skarzhet e-maez Nutréa

E 2014 ez a an traoù war-raok memes tra: kondaonet eo ar stal Nutréa, un isembregerezh eus Triskalia, gant lez-vern ar Surentez sokial. Pezh zo, da c'houde, eo bet lakaet ar c'hopridi-se er-maez ha goulnet a reont justis war ar poent-se ivez. Ur vaouez all, Edith Le Goffic zo deuet nevez zo da genderc'hel gant ar stourm, rak en em lazhet eo he gwaz war dachenn e labour, er memes stal.

Buhezioù en arvar

D'an 12 a viz Mezheven o deus savet klemm ar pevar implijad adarre abalamour ma oa bet lakaet buhez an dud en arvar: degemeret eo bet o c'hlemm e miz Gouere hag anvet ur banner imbouc'h da heul.

Eus tu ar bolitikerien e krog an traoù da cheñch ivez: dilennidi Europa Ekologiezh-Ar Re C'hias (EELV) zo bet klevet e Renerzh ar Yec'hed e Brusel, d'an 10 a viz Gwengolo.

Anna Kara

1. KASER Kuzul a-merzhel, sokial hag endro ar ranvro (CESER e galleg).

Adparc'hennomp hor sevenadurioù ! hon yezhoù !
23/10/2015
Kendiviz - Debet
Kemper - Quimper

Deomp de'!

24/10/2015
MANIFESTADEG
KARAEZ - CARHAIX

Manifestations du samedi 24 octobre 2015
"Un statut pour nos Pays, un statut pour nos Langues et nos cultures"
Alsace, Corse, Occitanie, Bretagne, Pays Basque, Outremer, ...
www.deompdeibzh

Deomp de'! 2015: manifestadeg d'ar 24 a viz Here e Karaez

Galvet o deus pennoù Kevre Breizh da vont da Garaez-Plougêr da vanifestiñ, d'ar Sadorn 24 a viz Here 2015. Aozadurioù all a zibuno e lec'h all er Stad c'hall en anv pobloù all gant an hevelep palioù diazez. Un toullad sizhonioù a-raok ar votadegoù-rannvro e klasko Kevre Breizh, kenurzhierzh sevenadurel kevredigezhioù Breizh, sachañ evezh ar gabalerien war krafoù zo. Sed azgoulennoù Kevre Breizh:

- sevel kenstroll triadell Breizh he femp departamant dezhañ ar galloudoù hag ar peadra evit e ziorreadur ekonomikel, sokial, sevenadurel hag hini an endro en un doare kempouezh
- kenofisielaat ar brezhoneg hag ar gallaoueg e-kichen ar galleg o terc'hel kont eus ar goulnet hag an intrudu sokial, o toujañ ouzh ingalded dellezegezh ar yezhoù hag ar gomzerien
- krefivaat an deskadurezh divyezhek brezhoneg/galleg dre soubirdigezh pe barel, hag al llesyezhegezh
- astenn d'an holl kelennadurezh yezhoù Breizh, he sevenadur, hec'h istor
- kas war-raok mediaoù brezhonek ha gallaouek, sevel ur radio hag un tele war pemp departamant Breizh.

Evit gouzout hiroc'h : www.deompdeibzh

Labour-douar: dibunadeg an traktorioù

Arabat eo kredin e vez implijet an traktorioù evit hadañ gwiniz, dougen ar golo pe kas dour d'al loened nemetken. Er mare-mañ e vezont implijet evit stankañ an hentoù. Daou vil traktor a oa tolpet e Pariz d'an 3 a viz Gwengolo da skouer. Kaset eo bet an dibunadeg da benn gant ar sindikad pennañ, an FNSEA (*Fédération Nationale des Syndicats d'Exploitants Agricoles*). Emañ ar sindikad-se a-zehou. Hervezañ emañ ar broduerien kig mouch en un hent-dall. Ne c'hallont ket ken gwerzhañ o c'hig d'ar vevezerien e Rusia abaoe ma'z eo bet votet an embargo gant pennoù Moskov. Mont a ra priz boued al loened war gresk. Ur c'hevrederezh digempouez zo, hervez an FNSEA bepred, gant produerien kig mouch Europa ar Peller e c'hall tuta gopridi en o lazhtioù gant kevratoù marc'had-mat. Gallout a reer ouzhpennañ an enkadenn a sko gant ar broduerien laezh. Dre ma'z eo echu koutz ar c'hotalioù [s.o. *Bremañ* niv. 403] e c'hall pep hini produiñ muioc'h-mui a laezh. Un dra zo avat... aet eo avat... aet eo priz al laezh d'an traoù.



E-touez an arc'hadurioù ez eo rouez re ar c'houlenn ur cheñchamant en aozadur ar marc'had. D'ar 15 a viz Gwengolo, evit lidañ digoradur ar Space (*Salon International des Productions Animales*) e Sant-Jakez-al-Lann, e-kichen Roazhon, eo bet stanket parkivoù Park an Diskouezadeg gant traktorioù izili *Coordination Rurale*, *Confédération Paysanne* hag APLI (*Association des Producteurs de Lait Indépendants*). Fellout a ra dezho reiñ da glevet eus ur vouezh er maezioù disheñvel diouzh hini ar FNSEA. Dic'halloud eo Stéphane Le Foll, ministr labour-douar Frañs. Gouzout a ra e teuo an diskoulm eus an divizoù europat.

Istor Breizh (e galleg) skignet gant ar chadennoù lec'hel niverel



Jean-Jacques Monnier hag Olivier Caillabet.

Skignet e vo 23 rann an heuliad *La Bretagne en Histoire*, gant peder chadenn niverel eus ar vro. Gant Tébéo, Tébésud ha TV35 e vez skignet bep Sul da 8e30 noz abaoe an 13 a viz Gwengolo. Gant Téléantes e vez graet d'ar Merc'her da 7e20 noz, bep eil sizhun, abaoe ar 16 a viz Gwengolo. Adskignet e vo ar rannoù er stumm replay e lec'hien ar chadennoù ivez. Savet eo bet an heuliad gant Olivier Caillabet, sevenser ha lusker, ha Jean-Jacques Monnier, kelennar war an istor hag arbennikaet war istor Breizh. Azaset o deus an aozerien evit ar pellwel o labour dre glevet, embannet gant Skol Vreizh en ur c'houfrij peder fladenn e 2012 [s.o. *Bremañ* niv. 367]. An 23 rann trizek munut zo savet evel kaozadennoù etre an daou zen, gant skeudenoù ha filmoù dielloù.

Gast!

Eured ar brezhoneg hag ar wregelouriezh



Standoù liseurt kinniget Gast! hag e-kreiz: 69^m kilometr Redadeg 2014, redet gant izil ar boctad.

Sed ur c'hinnig eus ar pezh eo Gast!, savet gant un ezel, Maelle Bramoullé.

Ar wregelouriezh. Ur ger gros eo hervez lod, un dra bouezus hervez lod all. Pe droug pe amzvin e lakafe e spered an dud, den ebet ne chom diseblant. Komzoù taer a vez klevet pe lennet goude ma ne c'houlenn ket al luskad wregelour traou spontus: kevatalder ar gwiriou etre paotred ha merc'hed na mui na maez. Kement-se eo e tifenn ar strollad Gast! gant nerzh, startijenn ha levezeg.

Krouet eo bet ar gevredigezh etre Kemper ha Douarnenez e miz Kerzu 2013 gant un nebeud merc'hed eus Bro-Gennev. Ar pal a oa e penn-kentañ kendivizout hep lakaat dalch ha poell er c'homzoù tro dro d'ur banne kafe pe bier diwar-benn kalz a zanvez disheñvel met atav gant un dra voutin: ar maouezed. Ne oa ket rat dezho gortoz kalz a amzer evit mont pelloc'h hag evit ma vefe tud nevez o kemer perzh er gaoz. Re wir ne vez ket gwelet mat ar wregelouriezh gant ur bern tud ha se zo kaoz ez eo mennetoc'h choazh an dud a gemer perzh e Gast!

Ouzhpenn se eo Gast! ar gevredigezh gwregelour divyezhek kentañ. Krouet eo bet gant merc'hed a gomz brezhoneg hag un nebeud all ha ne reont ket (evit choazh?). Estreget brezhonegered a zo e-barzh neuze hag estreget merc'hed zo ivez. An dalcho a vez lakaet war wel a sell ouzh ar baotred ivez, evel-just. Divyezhek hag "etrejenerat", Gast! zo stag

ouzh ar stourm evit gwiriou ar merc'hed hag ez eo war un dro un dra vat evit pindikaat ar sevenadur hag ar vuhez e brezhoneg. Tamm-ha-tamm e vez graet e vragoù da Yann pe da Vail

AN DODENNOÙ

Kaozeadennoù hag obererezhioù Gast! a vez kreizet war ar merc'hed hag o frankiz da savelañ anaoudegezh o c'horf. Ouzhpenn dodenn ar wregelouriezh hec'hanan, ar gevredigezh eus Kernev a glask gouzout diouzh ur bern danvezioù disheñvel. Ar reolioù, ar revelezh, ar gwiliou-din naturel, kenasant an darempredoù rev hag an hilastaliñ da skouer. An holl dodennoù-se zo liammet ouzh un dodenn all, gwirienn ar wregelouriezh: ar seksouriezh.


ARABAT CHOM HEP OBER TRA

Estreget kaozeadegoù a vez graet gant Gast!. Klask a ra an izili sevel kalz traou

disheñvel evit lakaat ar gaoz war ar merc'hed hag o gwiriou, diouzh un tu e lak lod da vagañ kaz, siwazh ha diouzh un tu all e ro peadra d'ar gevredigezh da wetel gwelloc'h penaos ober evit mont pelloc'h choazh en amzer-da-zont. E-touez hec'hererezhioù e oa bet graet un nebeud stajou: un devezh evit deskif penaos ober ur skarzhi eoul d'he c'harrtan, ur staj emzifenn hag ur staj war ar brezhoneg ivez. Ouzhpenn-se e oa bet un ataler fardañ ostilioù "staotat en he sav" hag a ro aezamant d'ar re o deus ur forzh. Evit "nozvezh ar merc'hed" e oa bet graet un dra dichortoz all: un *DJ set* ha ne oa nemet merc'hed ouzh ar billig. Kalz a labourioù all zo war ar stern met kregiñ a ra mat dija.

FESTIVAL CLITO'RIK

Hag evit bezañ nerzhus c'hoazh, perak ket aozañ ur festival nevez? Setu petra a oa bet graet gant ar gevredigezh e penn-kentañ miz Ebrel, un arvest anvet "Clito'riki



Ur stal-labour evit aozañ ostilioù "staotat en he sav"

Skipailh Gast! e-korzh festival Clito'rik, e Tregon.

Un abaden evit deskif skarzhi eoul he c'harr-tan.

plijadur ha revelezh", aozet e Tregon a-gevret gant ar Sterenn, Attac, Kevre gwiriou mab-den ha Drôles de Genres Heurieu. Ar pal, war a gompren diwar anv ar festival, a oa lakaat ar sekselezh war wel dre ar blijadur. E-pad tri devezh o doa gallet an dud sellout ouzh filmoù skignet er "Plijabus", kaozeal diwar-benn danvezioù a bep seurt, kemer perzh en ur bern stalioù-labour ha, dreist-holl, kemer perzh e div brezegenn "jestaouet" anvet *Qu'est-ce qu'un homme, qu'est-ce qu'une femme? Une autre histoire du sexisme* ["Petra eo ur paotr? Petra eo ur plach? Istor all ar revelouriezh"] ha *Le clito, un petit nom qui en dit long* ["Ellig, peadra zo da gontañ diwar e benn"]. Prederiadennoù ar wregelouriezh lakaet a oa bet dispaketaet fraezh gant an holl draoù se.

Mat eo ouzhpennañ e fell da izili kevredigezh Kemper diskuez n'eo ket ar wregelouriezh un afer merc'hed nemetken, tamm ebet. Ur stal-labour a oa bet kinniget d'an dud e Clito'rik evit "billañ pe

get?" pe c'hoazh ur gejadenn ouzh izili Ardecom, ur gevredigezh krouet evit kas imbouchioù war-raok ha diorren hilastaliñ ar wazed. Daou brantad-se ar festival a selle ouzh ar re a vez graet gwazed anezho. Soñjal a ra da verc'hed ha paotred Gast! eo ar wregelouriezh un afer a zenelezh.

UR FESTIVAL ALL 'PO?

Niverus e oa an arvesterien evit lid kentañ ar wregelouriezh ha plijet bras e voent. O c'hruisted hag o dud a reas d'ar festival ober berzh. Izili Gast!, hag o deus ur bern mennozhioù all da zispakañ, a soñj dezho aozañ un eil festival met chom a reont etre daou soñj c'hoazh. Gwelet e vo!

Maelle Bramoullé

1. hollad an doare-ober zo o fal mirout ouzh an engeñterañ (pilenn, stevell...)
2. Clito va bien (Planning familial du Finistère, 1979). Les branleuses (Fédération Baraja, 2010). Alors heurieux ? (Yvonne Debeauvais, 2009)

Evit gouzout hiroc'h

...diwar-benn Gast! Kemper?
Kit da weladenniñ pajenn Facebook ar strollad. Ul lec'hierenn eil, distag diouzh ar rouedad sokial mihvudet, zo war ar stern.
Adaazañ a ralo Gast! ur staj brezhoneg e kostez Kemper e-benn fin miz Here hag ur staj emzifenn evit ar merc'hed e miz Genver 2016.
Mont a ralo izili al luskad da gaozeal diwar-benn ar revelouriezh hag ar c'hevatalder paotred-merc'hed gant liseidi ha liseadeged Diwan Karaz ivez er bloaz mañ.
Un diskouezadeg a vo savet gant izili Gast! ivez diwar-benn an "treuzidentelezh" (*trans identity* e saozneg, *trans identidh* e galleg). E Breizh e vo aozet dizale.

Diwan emdroadur diabarzh ha diavaez



Liseidi Diwan e-kerzh ur vanifestadeg en Oriant, e 2007.

Emañ ar rouedad skolioù dre soubidigezh Diwan o voulc'hañ ur bloavezh skol nevez gant ouzhpenn 4 000 skoliad (3 865 anezhe a oa warlene). Evel bep bloaz pe dost emañ ar rouedad oc'h emdreññ gant skolioù nevez (Pontekroaz), skolioù serret (Pariz). Kreskiñ ha diorren n'eo ket anat evit ur framm kaset war-raok gant youl tud da gentañ. Prezidantez Diwan, Stéphanie Stoll, a lavar peseurt labourioù pennañ zo war ar stern gant ar gevredigezh.

Petra eo an tachennoù-labour pennañ bet dibabet gant Diwan evit ar mizioù pe ar bloavezhioù da zont?

Anat eo e fell dimp diorren ar c'helenn brezhoneg dre soubidigezh er c'hentañ hag en eil derez en ur virot kempouez ar c'hontoù evit derc'hel ar rouedad. Evit kas an diorren war-raok hon eus dibabet tachennoù labour diabarzh ha diavaez.

Tachennoù diavaez?

Sonjal a ran da gentañ er c'hendivizad a-ziforc'h evit yezhoù Breizh [ul lodenn eus an Emglev evit Dazont Breizh sinet e 2013, NGAS] a vo lakaet er pleustr a-benn ar fin. Pezh zo, n'hon eus lennet skrid ebet evit c'hoazh. Mat e vefe dimp kenlabourat met n'emañ ket Diwan er jeu. An trede emglev etre ar Stad hag ar Rannvro e vefe ha traoù resis a choulenn Diwan. Ul labour raktresañ ar postoù sirius da gentañ penn. Bep bloaz e vez degemeret tud er genstrivadeg ha n'eus post ebet. Arabat eo e vefe rediet an dud da varc'hata bep taol.

An eil tra eo krouiñ ul linenn arc'hant-

taouiñ war ul live dereat evit kreizenn stummañ Kelemn. Ur skodenn zo digant an Deskadurezh Uhel met kozhete eo er bloaz-mañ eus div drederenn. Da drede eo dav sevel un doare da lakaat da suraat ar postoù nann-gelennerien [postoù ATSEM, NGAS] evit ma vefent padus. Postet e vez aze arc'hant gant ar skolioù hag o izili ha n'hallont ket mirout an dud, prenet skiant gante. Fellout a rafe dimp ivez kaout ur skodenn digant ar Stad gouestlet d'ar buheziñ er chouskvaou en eil derez. Ur c'hraf strategel eo ivez, evit aesaat ha diorren ar vuhez e brezhoneg e-maez ar c'hentelioù. Gant ur gevrat solut e vo kreñvoc'h ar rouedad.

Kaoz zo kalz eus kresk an niver a skola-jidi hag a liseidi da gentañ...

Ur bodad-labour diabarzh zo o plediñ gant al lise. Ur c'hresk skoldi a 10% zo bet e tri bloaz ha kenderc'hel a raio. Daou hent zo: sevel savadurioù ouzhpenn e Karaez pe sevel un eil lise. Ha pelec'h e

vefe? O prederiañ emaoomp. Poent bras eo kavout emglev gant an Deskadurezh Stad, evit ar postoù, hag ar Rannvro, evit ar savadurioù.

Meneget ho peus tachennoù labour diabarzh?

Er bloavezh 2014-2015 ez eus bet savet ur studiadenñ pouezus-kenañ diwar-benn an aozioù labour e Diwan. Gouzout a reomp ez eus kalz a draoù da wellaat. Diwar an diagnostik-se e labouromp gant an implijidi evit dibab palioù ha gwelet penaos tizhout anezhe. En emvod-meur a zeu, e miz Here, e labourimp evit kreñvaat buhez kevredigezhel ar rouedad, en ur reiñ ur plas nevez d'an implijidi er mont en-dro, da skouer.

Skouer un dachenn labour diabarzh all ho pefe da reiñ dimp?

Ober gant meziantoù brezhonek ar muiañ ar gwellañ. Ul labour dedennus e vo, evit an dud a-youl vat kenkoulz hag evit ar skolaerien.

Komzoù daoustmet gant M.L.

Ur sizhunvezh e kalon Radio Kerne



An animatorezed Lou Milour ha Laetitia Fitamant ouzhi taol studio berbiad Radio Kerne o Douarnenez.

Evel bep bloaz e vez kaset abadennoù Radio Kerne war-eeun eus 38^{vet} Gouel ar Filmoù e Douarnenez [s.o. Bremañ, niv. 403]. Penaos e vez savet seurt abadennoù, en ur c'houzout e vezont skignet war Arvorig FM, Radio Kreiz Breizh ha Radio Bro Gwened war an hevelep tro?



emgav d'al Lun 24 a viz Eost da 11 eur vintin e ti Daoulagad Breizh e Douarnenez, gant an animatorezed Laetitia Fitamant ha Lou Milour evit stallañ al lech enrollañ. A-raok ma teufe Gael Helary, an teknikour, e ranker kempenn ha skubañ un tamm sal an dielloù evit treuzfurmñ anezhi en ur studio radio.

PRIENTIÑ AN ABADENNOÙ

Dibae ar Gwener da noz dija emañ Laetitia ha Lou war ar lech evit daremprediñ an dud pedet, ar vrezhonegerien, ar filmaozerien och enrollañ anezho pe o klask kenderc'hin anezho da vont da gomz war-eeun er studio.

Tremen a ra bann an endervezh, pep hini aet diouzh e du, da selet ouzhi filmoù evit Mervin, pe da enrollañ soñjoù kentañ an arvesterien evit Ninnog ha Melena. E-tro 4e30 g.k. eo bodet an holl er studio. Un eurvezh a chom a-raok reiñ lañs d'an abadenñ war-eeun. O kemer neñ emeur... Hag a-walc'h a voued a vo? Hag e koulz en em gavo ar gouvidi? Ha dedennus e

vo ar pezh a vo lavaret ganto hag ar goulennoù savet gant al luskerien? Petra eo titloù ar chanaouennoù bet dibabet gant Gael dija?

BILANS AR SIZHUNVEZH

Echu gant ar sizhunvezh dija. Un eurvezh bemdez zo re verr evit ur festival e mode. Kement a zanvez a zo, kement a sevenadurioù, kement a stourmoù, kement a raktresoù war ar stern... Ne c'haller ket mont donoc'h na menegiñ pep tra. Un tañva eo eus ar pezh a zo bet gwelet, evit reiñ c'hoant d'ar selaouerien da c'houzout hiroc'h.

Skuizh ha laouen eo ar skipallh war un dro. N'eo ket aes kas da benn un abadenñ war-eeun, ingal e ranker berraat ar pezh a oa bet rakwelet evit reiñ muioc'h ar gaoz d'an dud pedet. Gant red didreuz an amzer, gant ar realizatourien a flap kalz re ha lod re nebeut, gant ar re abafet gant ar mikro, e rank an animatourien ha paotr ar son bezañ aketus ha war evezh atav. A-dreñv e letrinn emañ Gael o c'hoari gant ar boutonoù, o klask kaout ur son

ingal mat pa vez an den pedet o kilañ pe o tostaat dizehan diouzh e vikro. Lou ha Laetitia a lak startjenn ha fent ivez pa welont pa vez ket an den pedet en e vlead gant ar brezhoneg da skouer, klask a reont sikour anezhañ o reiñ mel dezhañ. Ret eo dic'hastriñ, n'eus ket amzer da goll dreist-holl pa vez an abadenñ war-eeun, hag e tremen gwall vuan an eurvezh. C'hoarzhaedegoù a glevet ivez, gant kronikenn sinema Mervin, paotr Radio Bro Gwened, peurgetek. Ne oa ket anat kaout fent gant tem poblou an Andoù rak hiziv an deiz e vezont jahinet c'hoazh.

RADIO KERNE BERR-HA-BERR

Ne ouezer ket re pet den a selaou Radio Kerne rak n'eus bet sonadeg ebet, koustus-tre eo. Hervez Lou e vez podskignet ingal an abadennoù, tamm-pe-damm 3 000 gwech. Tu zo da adselau abadennoù festival sinema Douarnenez e lec'henn internet Radio Kerne.

Valérie Karvello

Evit gouzout hiroc'h: www.radiokerne.bzh

Kroashent ar radio brezhonek

Bodañ a ra ar gevredigezh "Brudañ ha Skignañ" ar chadennoù radio vrezhonek. Drezi e c'hall Arvorig FM, Radio Bro Gwened, Radio Kerne ha Radio Kreiz Breizh eskemm ha kenproduiñ abadennoù pe c'hoazh bezañ selaouet dre lec'hienn internet Radio Breizh. Anna Jaouen zo karget eus ar c'henniurzhiañ hag an diorren e Brudañ ha Skignañ ha kontañ a ra hiroc'h amañ diwar-benn labour an aozadur.

Gallout a rit displegañ d'hol lennerien petra eo Brudañ ha Skignañ?

Ur gevredigezh a vod ar radioù e brezhoneg an hini eo. He fal: diorren an eskemm abadennoù, broudañ da genproduiñ programmoù radio e brezhoneg ha produiñ hec'h-unan.

Pemp den zo gopret gant Brudañ ha Skignañ hiziv, pevar c'helaouenner en o zouez. Tutaet e vez stummerien, animatourien ha komedianed ivez evit kas labourioù zo da benn vat. Archantaouet eo ar gevredigezh gant ar Rannvro ha departamantoù Penn-ar-Bed, Aodoù-an-Arvor hag ar Mor-Bihan. Mat eo menegiñ eo meret Brudañ ha Skignañ ha kemeret an divizoù gant ur chuzul-merañ ennañ izili a-youl vat o tont eus ar radioù war-eeun, n'eus den eus an diavaez. Ar radioù eo a ver ar gevredigezh.

Peseurt abadennoù a brodui?

Keleier ar Vro eo ar programm pouezusañ a vez kaset da benn ganeomp a-drugarez d'ar pevar c'hazetenn ar labour e pep radio ezel eus ar rouedad: Arvorig FM, Radio Bro Gwened, Radio Kerne ha Radio Kreiz Breizh. Pol keleier Brudañ ha Skignañ zo e servij ar pevar radio-se, gant un aozadur hep urzhaz hag a ra pinvidigezh hon abadennoù: war hentoù Breizh-lizel a-bezh e reont e-tro 3500 kilometr ganto pep bloaz evit fardañ e-tro 700 kelaouadenn. Degemeret e vez ivez penadour-komz fardet gant animatourien ar radioù. Dre ar cheleier, kinniget er pevar radio war an dro, e vez klevet tud a bep seurt hag a gomz diwar-benn suedoù liesseurt, pe e vefe ekonomiezh, stourmoù, lezennoù nevez, darvoudoù sevenadurel pe sport ha kement zo, gant

livioù brezhoneg dishefvel bep taol. Lod tud eo ar brezhoneg o yezh-vamm ha lod all o deus he desket. Er muiant eus an dud aterset n'o doa ket bet tro da vezañ a-raok. Etre 5 ha 80 vloaz int. Ur skeudenn wirion eus ar vrezhonegerien hiziv a vez roet da glevet neuze hag ul labour a bouez eo evit diorren implij ar brezhoneg er gevredigezh a vremañ.

Estreget keleier a brodui?

Ya, liesaat ha krefaat ar produiñ radio e brezhoneg a fell deomp ober: abadennoù nevez evit ar vugale evel an heuliad *Loenig-Ioan* e 2013-2014, krogadoù mello-droad dibaoe 2013 hag ar magazin miziek *Sevenadurioù* dibaoe miz Here 2014. Kement-se a vez produet gant Brudañ ha Skignañ ha skignet war radioù ar rouedad ha pelloc'h c'hoazh.

Petra eo labour ar gevredigezh war ar pemdez?

Mont-en-dro ar Pol keleier eo an dachenn-labour bennañ eta evit sevel keleier a-zoare war ar pemdez. Labourer e vez kalzik ivez war ar porched Internet Radio Breizh¹ a ro tro da lakaat labour ar radioù ezel da vezañ anavezet gwelloc'h ha da Yann Vrezhoneger ha da Gatell Vrezhoneger e selaou brezhoneg dre ar rouedad n'eus forzh pelec'h, e Pornizh koulz hag e Nourmea, dre *streaming* [skignadur war-eeun] evel just met ivez o c'hoari gant ar podskignañ.

Kinnig a reomp ivez stummadurioù micherel d'ar gazetennierien, d'an animatourien ha da verourien ar radioù. Dibaoe 2010 e kenlabouromp gant Klub mediaoù Breizh ha kevelerien all evit aozañ stajoù a-feson amañ e Breizh, pa

oa ret mont da Bariz betek-henn. Dagefiver ar stajoù e vez lakaet tud ar radioù da gendivizout. Sikouret e vezont da dermeniñ o raktresoù ha d'o chas da benn. Alles e tiwan mennozhioù nevez goude: stankoc'h e vez an eskemoù etre ar radioù o deus kemeret perzh e seurt stajoù. Digor d'an holl eo hor stummadurioù, un digarez eo neuze da ginnig d'ar radioù kevredigezhel all e Breizh skignañ abadennoù brezhonek.

Ha cheñchamantoù zo deuet e labour ar radioù diwar krouidigezh al lec'hienn Radio Breizh?

Porched Radio Breizh zo bet ijinet evit ma vo ar muiant ar gwellañ a dud o selaou ouz an abadennoù radio ha n'eo ket evit kemer plas ar skignañ dre ar gwagennoù FM. Daoust n'eo bet un dispach da vat evit ar selaouerien, ne soñj ket din en dije cheñchet kalz labour an animatourien radio. Al labour pennañ a chom bepred fardañ ha kinnig abadennoù radio a-hed an deiz. Ober war-dro ar podskignañ a gemer un tamm amzer met ret e oa en em ober ouz modoù nevez ar selaouerien da zaremprediñ ar mediaoù dre internet. Gant ar benveg-mañ avat ez eo aesoc'h d'ar radioù brudañ ha skignañ an abadennoù, embann ar podskignadoù war ar rouedadoù sokial... Spletus eo evit kehentiñ neuze.

Aesoc'h eo ivez furchal e-barzh an diaz: an dielloù ebarzhet tamm-ha-tamm a ro an tu d'ar radioù da binvidikaat ar programmoù a vo graet en amzer-da-zont dre ur protokol teknik savetif: 27 003 media a zo e-barzh diaz dielloù Radio Breizh hiziv, danvez prizius evit gwarantif, studiañ ha diorren ar brezhoneg eol



An abaden Sevenadurioù a vez kenbroudet gant Brudañ ha Skignañ, Radio Kreiz Breizh, Radio Bro Gwened ha Bretagne Culture Diversité (BCD), ha lusket gant Christian Rivoalen.

Penaos e wellt an amzer-da-zont evit ar skingomz vrezhonek dre vras? Ha raktresoù ho peus evit ledanaat ar c'hinnig pe sevel traoù nevez?

Pell emamp c'hoazh eus ar pezh a rank-femp ober. Re dreut eo ar skipallhad evit kinnig abadennoù keleier ha sevel kelaouadennoù a-hed an deiz, ne vez ket kinniget programmoù fresk e-pad an dibennoù-sizhun, krennet e vez ivez war ar produiñ e-pad ar vakañsoù peogwir n'hallomp ket lec'hiañ an dud. Daou vloaz zo, abalamour da gudennou archant hon eus ranket digreskiñ an niver a implijidi ha ne 'z a ket war wellaat stad ar yalc'hadoù publik, siwazh. Diaes eo produiñ muioc'h a programmoù gant nebeutoch-nebeutañ a dud gopret ha stummet. Raktresoù abadennoù nevez zo met dre ziouer a amzer hag a archant n'eus ket tu o chas da benn evit c'hoazh.

Kendalc'het e vo gant an abaden *Sevenadurioù*, kenbroudet gant Brudañ ha Skignañ, Radio Kreiz Breizh, Radio Bro Gwened hag ar gevredigezh Bretagne Culture Diversité (BCD) dibaoe miz Here

2014. Gant Redadeg 2016 e c'hallimp kenlabourat ivez gant an ti-embann Kelt Vimp Bev ha Sten Charbonneau evit enrollañ kontadennoù evit ar vugale.

Traoù nevez a vo e-keñver lec'hienn Radio Breizh?

Diorren ha pinvidikaat lec'hienn Radio Breizh zo ret ober ingal: ur benveg radio *on demand* [diouzh ar goulen] a oa bet aozet warlene hag a ro an tu da bep hini da sevel ur radio diouzh e c'hoant gant un dibab abadennoù eus ar c'hwec'h radio skignet dre ar porched². A-benn fin ar bloaz e vo adsavet al lec'hienn e doare *responsive design*³ ha hirc'hortozet eo an arload Android ivez gant ar selaouerien (iBzh evit an iPhone zo bet adkempennet warlene). Un emglev a genlabour a vo sinet dizale gant BCD evit adkavout dielloù an abadennoù radio meret gant Radio Breizh war porched Breizh.⁴

Traoù all a fell deoc'h menegiñ?

Fellout a ra deomp kemer perzh er Celtic Media Festival ivez evit brudañ ar radio brezhonek hag eskemm gant mediaoù

ar brolioù keltiek all. Liesvedia eo ar bed a vremañ, ret eo neuze labourat a-stroll. Souezhus ha dipitus war un dro e kavan e vefe graet anv alies eus "ar chleweled" ha peurliesañ ez eo ar skinwell hepken a vez kaoz anezhañ. Pa vez aozet manifestadegoù evit kaout muioc'h a vrezhoneg er mediaoù ez eo da gentañ eus an tele e vez kaoz, da skouer. Padal, hervez son-tadegoù Mediamétrie e selaou an dud etre 15 ha 49 vloaz muioc'h ar skingomz eget ar skinwell! Ur benveg hep e bar e servij ar brezhoneg eo ar radio ha keñveriet gant mediaoù all ne goust ket ker. Bremañ pa vez kaoz eus *global media* e ranker kaout ur sell ledanoc'h hag empennañ doareoù nevez da genlabourat evit bezañ efedusoc'h ha kinnig ur plas dereat d'ar vrezhonegerien ha d'o yezh er mediaoù.

Komzoù dastumet gant M.L.

1. www.radiobreizh.bzh
2. abadennoù brezhonek RCF Rivages ha re c'hallaek Plum FM a vez kinniget ivez
3. d.l.e. lec'hiennoù azas ouz skorioù liesseurt (poellgomzerioù, tablazennoù...)
4. www.breizhania.bzh

Hentoù evit ar radio en amzer-da-zont

Radio ha tele, radio pe tele? Alies-mat eo bet dalc'het o anv kentañ gant ar mediaoù kozh pe "istorel". Ennañ e vez kavet roud eus framm diazez ar media pa oa bet krouet. Ar BBC da skouer a lak anat ar ger **broadcasting** (skignañ) hag a chom e kreiz o c'hefridiou a vremañ...



Lec'hienn Bansi an olifant, savet gant RTV Slovenia a-razho evit ar vugale, abadennoù radio anni.

Un nebeud mediaoù "istorel" o deus dalc'het ivez ar stumm "Radio-Tele". Da skouer, strollad Spagn a zo "RTVE" e anv evit ar radio hag ar c'halle bezañ noterenet evit meur a vedia, evel RTBF Wallonia pe c'hoazh VRT Flandrez. Ne vez ket dalc'het an anvioù hengounel dre ziegli nemetken... Pa oa bet divizet e 1998 cheñch stadoù ar BRITN - par da RTBF Flan-

drez - e oa bet divizet gant renerien an ti tennañ kuit al lizherenn "B" evit "Belgia", evit dont da vezañ VRT, da lavaret eo *Vlaamse Radio en Television*. Dalc'het e oa bet "Radio" ha dilamet "Belgia."

TELE HA RADIO DISPARTIET
E gwirionez, Ral a wech e vez dalc'het ur c'henlabour efedus etre rann an tele hag hini ar radio. Ar c'hontrefed zoken, Michereien ar radio a vez ingal o klemm dirak koust divent an tele hag e vefe kaoz eus ar skeudennoù nemetken. En tu all, michereien an tele a glemm ingal diwar-benn doareoù labour kozh re ar radio. An unander "RTV" a vez dalc'het dre an anv nemetken peurvuiañ. Ha santet e vez muioc'h-mui gwask ar skeudennoù war ar c'homzoù. Kinniget e vez skeudennoù gant an darn vrasañ eus ar chadennoù radio ivez bremañ, dre ur webcam da skouer, evit an abadennoù radio brudetañ alies.

HENT AL LIESVEDIA
Gant un emdroadur a seurt-se e klask ar chadennoù radio hentoù nevez evit derc'hel da zesachañ ar versterien. Unan eus an hentoù-mañ a c'hell tremen dre ar servijoù liesvedia. Alies-mat e vez lakaet seurt servijoù er pleustr gant broadoù bihan evit abegoù arc'hant. Kinnig a ra

RTV Slovenia da skouer ur servij dedennus evit ar vugale: kavout a reer ennañ kement danvez stag ouzh ar bugaleaj gant abadennoù tele gouestlet d'ar vugale kenkoulz ha kontadennoù, arzkrouñ, levrù, c'hoarioù... hag abadennoù radio! Kement-mañ dindan an anv nemetken, *Bansi*, anv un olifant fri-furch. Kasour ur bern programmoù eo-ehañ ha gouest eo da respont d'ar goulennoù savet war-eeun dre ar web war an dro.

Meur a wech eo bet meneg BBC Alba evit a sell ouzh o doareoù da labourat o veskañ radio, tele ha programmoù war ar rouedad. Lakaet eo bet er pleustr gant BBC Alba, war dachenn ar c'heleier dreist-holl, ur reizhiad nevez da labourat. Savet e vez ar c'helaouadennoù gant ur c'hazetenner pe ur skipailh kazetennerien media evit dont a-benn da sevel ar gelaouadenn. Ingale eo dezho an doare media, an danvez an hini a gont da gentañ-penn. Un dibab a seurt-se zo d'udius evit ar "sellerien-selaouerien". Aes eo kavout pe adkavout ar programm war ar web, dre ma vez dalc'het kont eus an danvez, ha kinniget e vez ar c'heleier e meur a zoare alies, pe dre skeudennoù, pe dre son pe dre skrid.

Brasañ risk an doare-mañ eo bezañ kollet

Ar Maezioù
D'ar 16 a viz Gwengolo goude-merenn, e sal an Armez e Brieg, e oa bet c'hoariet, hag enrollet war un dro *Ar Maezioù*, stumm vrezhonek ar pezh *The Country* gant Martin Crimp. Dirak ur saliad arvestouren e oa bet graet an enroladenn. Gant skipailh Teatr Piba e oa bet kaset an abadennoù d'ar horoz-se da benn, produet gant ar gevredigezh Dizale ha Radio Kerne. Skignet e oa bet da 8e noz goude-se war gwagennoù ar chadennoù radio kernevat, kement a re Arvor FM, Radio Bro Gwened ha Radio Kreiz Breizh. Podskignet e vo ivez.
Evit gouzout hiroc'h: <http://teatrpiba.com>

Teknologiezhioù nevez evit selaou ar radio

Mat eo goulenñ grañs ha war un ton bras kaoz ur chadennoù radio vrezhonek, pe meur a hini, hag a vefe skignet war Breizh a-bezh, evel-just. Dre an teknikoù skignañ niverel avat e vije aesoc'h ha marc'hadmatoc'h.



Ur berveg evit selaou ar radio kevreet ouzh internet.



Ar porched BBC iPlayer a ginnig chadennoù radio ha tele ar BBC mesk-ha-mesk, e meur yezh.

er mor a programmoù kinniget dre ar rouedad. Beuzet eo ar programmoù gouezelek ha kembraek e-touesk reoù all ar BBC hiziv an deiz. Deuet eo a-benn ar BBC da lonkañ ar programmoù tele pe radio a zeu eus kement chadennoù stag outi e doare pe zoare dre ar BBC iPlayer. Ne vez ket dalc'het kont kement-se ken eus ar yezh daoust ma c'haller dibab hini ar porched. Deuet eo ar yezhoù da vezañ unan eus an dezverkoù liesseurt a vez kavet e pep porched: n'emañ ket mui e kreiz ar porched. Seblantout a ra neuze S4C, BBC Alba hag ar re all bezañ soubet e-touesk ar chadennoù e saozneg.

ARNODIÑ GANT PLIJADUR AR SELAOU
Peseurt dibab ha peseurt dazont neuze evit ar radio brezhonek? Chom a ra ur media dedennus ha d'udius pa zeu a-benn da ginnig un dra ha na vez ket kavet gant ar re all. Marteze a-walc'h neuze e chom hentoù all da zifraostañ, diazezet war ar son hep muiken. Distreiñ war ar c'hrouñ dibar, braventez ar yoezh ha saourusted ar yezh a c'halle degas soñjoù ha doareoù nevez. Ar gwir hag ar youl da arnodin a zo moarvat pouezusoc'h c'hoazh evit amzer-da-zont ar radio hag amzer-da-zont hor yezh.

Gant an teknologiezhioù nevez diwanet diwar ar genrouedad e c'haller ober iradoù evelkent. Lakaomp hoc'h eus c'hoant da selaou ho radio muiañ-karet e brezhoneg: Radio Kerne, Radio Kreiz Breizh, Radio Bro Gwened, Arvorik FM ha kement zo. E Roazon pe Naoned emaoch o chom avat ha kaiz diaesoc'h emañ an traoù e Breizh-Uhel, siwazh. Gouzout a rit evat e c'haller selaou ar radio-se war-eeun dre internet dre Radio Breizh. Ul lec'hienn dispar an hini eo, savet gant ar gevredigezh Brudañ ha Skignañ [s.o p. 18-19], abadennoù podskignet e-leizh enni! Koulskoude, ar pezh a blijfe deoc'h eo selaou programmoù e brezhoneg evel m'oc'h boas d'ober evit n'eus forzh peseurt chadennoù radio all: gant ur gwir post-radio, lakaet war daol ar gegin, ar gambre pe er sal-dour, evit selaou e-kerzh merenn, kom, lein, evit dihuñ pe dirak ar melezour... Selaout mat! An dra-se n'eo ket ken diaes-se d'ober. Ret eo deoc'h prenañ ar pezh a vez lesanvet e saozneg flour un *internet-radio*, da lavaret eo ur voest dezhi stumm ur post-radio, kevreet ouzh internet dre ar Wi-Fi pe dre ur fun *ethernet* (ha red tredan an ti). Gwazhoù web chadennoù radio ar

bed a-bezh a vez tapet ganti hag ar vrezhonek en o zouez!
E giz-se, beure-mat pe diwezhatoc'h, en ur zijaññ pe en ur fardañ boued, e c'haller selaou hoc'h abadennoù muiañ-karet. Ouzhpenn-se e vez kavet war marc'had ar binvioù elektroniek ardivinkoù zo anezho radioloù dre skinoù ha pe dre internet war un dro. Diaesoc'h e vo un tamm memes tra ma fell deoc'h selaou ur radio e brezhoneg bennak er c'harn-tan, en ur vleniañ evit kas ho vugale d'ur skod vrezhonek... Biskozh kement all, n'eo ket ken gwir ha se an traoù! Bremañ e c'haller selaou ar radioloù dre ar rouedadoù 4G. Ret eo deoc'h pellegañ ur meizant arbennik, lugañ ar poeligomzer ouzh sisten son ar wetur, gant ma vo kevreet ouzh internet evel-just, ha mont a rano an-dro. Troc'hoù a vo memes tra peogwir n'eo ket goloet mat ar vro gant ar rouedadoù 4G, pell ac'hano, met kement-se a c'hall mont war wellaat. An teknologiezhioù nevez zo mat ivez evit ober traoù kozh!
Jean-Michel Sanner
1 c'hemlec'hioù gwazhoù web ar chadennoù radio brezhonek (a furm mp3 pe Ogg Vorbis peurlusañ) a gaver e lec'hienn Radio Breizh: www.radio-breizh.fr

Samuel Julien

Yan' Dargent un arzur kevrinus

Kalzika a zanvez brezhonegerien o deus klevet kaoz eus an daolenn *Le Père Maunoir obtient le don de la langue bretonne*, kludet e-barzh iliz-veur Kemper. Hag ul lodenn vras anezhe a bed ivez evit deskiñ brezhoneg ken buan hag an Tad Maner! Pet anezhe a oar piv en doa livet an daolenn vrudet-se? Yan' Dargent an hini eo. N'eo ket anavezet kement-se, daoust d'e labour arzel bras diwar-benn Breizh. Sed aze peadra da chouzout hiroc'h diwar e benn ha dougen bri dezhañ.



Livadur Yan' Dargent en iliz-veur Kemper.

Jean-Edouard Dargent (e anv gwir) zo bet ganet d'ar 15 a viz Here 1824 e Sant-Servez-Landivizio, Bro-Leon. E dad a oa genidik eus Elzas, kemeret en doa da bried merc'h rener un ostalери bloaz a-raok. P'eo daou vloaz Yan' Dargent e varv e vamm. E dad a ya da Landerne da gavout labour ha fiziout a ra e vab en e dud-kaer e Sant-Servez-Landivizio. Plijadur en deus Yan' Dargent gant ar vuhez-se en natur, och ober war-dro ar saout, o foetañ bro...

UR BUGALEAJ GANT E DUD-KOZH

Levezonet eo kalz gant ar c'hontadennoù hag ar sorc'hennoù kontet gant e vammigozh. Istorioù ar Gelted Kozh, ar c'horriganed, ar Sent... Da vezañ skoller er c'hentañ derez e oa bet kaset da Blouared evit deskiñ gant un eontr kozh dezhañ. Eno en deus graet anaoudegezh gant un den a chomo unan eus e vignoned karetañ: Fañch an Uhel. Da bevarzek vloaz eo kaset gant e dud-kozh da Skolaj ar C'hreizh-kêr e Kastell-Paol met ne blij ket ar studiu


dezhañ hag e chom a-sav buan a-walc'h. Da c'hwec'h vloaz e adkav e dad e Landerne. Un taol chañs en deus; kavout a ra ul labour en ur gompagnunezh labourioù publik e Brest hag a oa o klask tud yaouank donezonet gant an tresañ.

UR VUHEZ ARZOUR DIC'HORTOZ


E 1844 emañ e Troyes. E gompagnunezh he doa bet ur marc'had eno: tresañ ul linenn hent-houarn nevez. Ober a ra anaoudegezh gant ul livour a vicher; Jules-Nicolas Schitz. Broudañ a ra anezhañ da vont war-zu an arz ha dilzezel e labour goude bezañ gwelet e galaroù tresaadennoù. Kemer a ra e amzer ha kregiñ a ra da livañ war-dro 1848. E daolennoù kentañ a zo gwerzhet e-barzh un tombola. Dimezet eo e 1848 hag ur bugel en deus e 1849. Etre daou emañ c'hoazh met e 1850 e tibab a-benn ar fin ar vuhez arzur ha cheñch a ra e anv evit dont da vezañ Yan' Dargent. An dek bloavezh da heul a vo start-tre evitañ, ral a wech e vez diskouezet, met peurlipat a ra e arz ha kenderc'hel a ra da grediñ ennañ.

BURZHUD LES LAVANDIÈRES DE LA NUIT

Kavout a ra e awen e-barzh mojennoù Breizh hag e gorn-bro orin. E Saloñs Pariz 1861 e tiskouez peder zaolenn: *Souvenirs de collège*, *Les Pilleurs d'épaves*, *Pâtre des plaines de Kerlouan* ha *Les Lavandières de la nuit*. Gant an daolenn-mañ e ra berzh forzh pegement, istor kannerezed-noz a c'houlenn digant an dud kollet gwaskañ al liñselioù evit o disechañ, ha lazhet goude gante. Anv a vez anezhi er c'hazetennoù, begenn Pariz a ya d'he gwelet ha mont a ra e vrud betek Bro-Saoz. Prenet eo an daolenn gant Lord Hamilton e 1862 e-doug Diskouezadeg hollvedel Londrez. Kollet eo bet dibaoe. Yan' Dargent en doa livet unan all e 1888, bravoc'h c'hoazh hervez an arbennigourien, hag a zo bremañ e Mirdi Arzoù-kaer Kemper. E daolennoù all war-lerc'h n'o devo ket ar memes planedenn. Ret eo dezhañ tresañ evit al levrioù evit gounit e damm-bara. E daou-ugent vloaz en deus skeudennaouet ur bern levrioù. E anv a vez kavet e-barzh



Peg gwerz ar marc'had



Peg gwerz ar marc'had



Ouzhpenn taolenn vrudet *Les Lavandières de la Nuit* (a-us), en doa Yan' Dargent skeudennaouet tremen daou c'hant levr, un droidigezh c'hallek eus *An Divina Commedia* en o zouesk (a-zehou).



ouzhpenn 200 levr, ha tro-dro 50 graet gantañ hepen. Levrioù brudet er mare-se e-giz *La Divine comédie*, *Les Contes bleus*, *Les Vrais Robinsons*... N'eo ket renablet e holl dresadennoù c'hoazh met koutañ a reer ouzhpenn 5 000 tresa-denn. Ul labour marc'h. Brudetoc'h eo d'ar mare-se evit e dresadennoù eget e daolennoù.

LIVOUR AR SAKR

Adalek 1870 e krog gant al livañ arz sakr. Labourer en doa e lec'hioù relijiel e-leizh met dreist-holl e-barzh tri anezhe: iliz Sant-Servez-Landivizio, iliz-veur Kemper hag iliz Sant Houardon e Landerne. E labour brasañ eo hini an iliz-veur. Eskob Kemper en doa goulennet digantañ e 1871 kinklañ chapelioù an iliz-veur. E-pad eizh vloaz en doa graet war-dro ar chanter. C'hwec'h livezh moger en doa livet. Gouc'hennennouet e oa bet zoken gant prezidant ar Republik Mac-Mahon e 1874. Aze en doa livet *Le Père Maunoir obtient le don de la langue bretonne* hag ivez *Le Prêche de dom Michel De Nobletz*. Brudet-kenañ eo e Breizh a-bezh evit e arz sakr

ha klasket en doa respont d'an holl c'houlennoù bet kaset dezhañ evit kinklañ lec'hioù relijiel all: Montroulez, Brest, Naoned, Gwitalmeze, Plougerne, Plouvien, Bodsorc'hel... Anavezet eo e-giz un arzur kredennour.

DIBEGADUR AR PENN

E fin ar c'hantved en deus kudennoù archant ha gwerzhañ a ra e vaner a-raok mont da Bariz evit bevañ e ti e vab. N'eo ket ken anavezet-se c'hoazh. Ur prantad startoc'h eo, evel en deus bet adal deroù e vuhez arzur meur a wech. Mervel a ra d'an 19 a viz Du 1899, e divreth e vab nemetañ, Ernest. Daou vennad en deus disklêriet a-raok mervel. Da gentañ, bezañ douaret e bered Sant-Servez-Landivizio. Sizhun war-lerc'h eo bet kaset dre an tren betek eno ha douaret. Ha da eil, doujañ d'ur c'hiz kozh e Bro-Leon hag a oa aet un tammig da get d'ar mare-se c'hoazh: dibegadur ar penn (*la décollation du chef*) e galleg). Pemp bloaz goude bezañ beziet ar c'horf marv, eo diveziet ha dibennet evit lakaat e glopenn e-barzh ur voest koad er garmel. Ne chom nemet

eskern goude ar pemp bloaz-se, sañset. Evit Yan' Dargent e oa bet graet eizh vloaz goude ha souezhusat trañ Divoullch e oa ar c'horf. Ret eo ober gant ur gontell evit didroc'hañ, ar pezh a ra ar beleg. Un nebeud kazetmerien eus Pariz zo war al lec'h siwazh hag en deziou goude en deus Yan' Dargent ur brud nevez goude e varv. Hag evit tud ar vro, brud tud ouez...


Maksim Touzé

1 skrivet en deus Charlez ar Govig diwar-benn dibegadur ar penn e *L'Âme bretonne*

Evit gouzout hiroc'h

Kit da welet ar mirdi gouestlet d'an arzur e Sant-Servez-Landivizio. Digor e vez bemdez, war-bouez ar Yaou, etre miz Gouere ha miz Gwen-golo, etre 2e ha 6e g.k. Mod-all prenit al levr Yan' Dargent, skrivet gant Jean Berthou hag embannet gant Coop Breizh (2014) ha levr bannoù-treset Nina Luec, Yan' Dargent, embannet gant Les Éditions de l'Euif (2014).

Filmoù Tarantino Feulster evit freuzañ ar feulster?



Harozezed eil lodenn Death Proof (2007)



Ar filmaozer Quentin Tarantino

Start eo selaou ar radio, sellat ouzh ar pellwel pe lenn kazetennoù hep klevet traoù feuls. Ouzhpenn er c'heleier e vez komzet eus feulster: en abadennoù ha filmoù sirius pe farsus ivez. E pep lec'h e vez gwelet feulster. E kevredigezh ar feulster e vevfemp neuze ha mat pell zo? Penaos ober evit bevañ heptañ? Evit tud zo n'eus netra tonket hag e kinnigont ur savboent disheñvel. En o zouesk emañ filmaozer amerikan Quentin Tarantino.

tud zo a soñj dezho e plij ar feulster d'ar severer-mañ. "Sot e vefe gant ar gwad hag implijout a ra donata e-barzh e filmoù" a lavarent. E filmoù, gwir eo, zo kalz a feulster enno. Lakaat a ra ar feulster e kreiz e oberennoù zoken. Adalek penn kentañ pep film betek ar fin e vez implijet ar feulster gantañ. Da lavaret eo e ra eus ar feulster ur poent lochañ evit deskrivañ ar gevredigezh a vremañ. Sammañ a ra Tarantino e savboent ha klask difenn anezhañ.

TARANTINO, STOURMER EVIT AR MERC'HED

Death Proof (2007) n'eo ket ar film anavezetañ nag an hini gwellañ graet gant Tarantino ha koulskoude eo ar splannañ evit lakaat war wel ar stourm evit gwirioù ar merched. Div lodenn zo: an hini gentañ a ginnig ur sell giz kozh (gwenn-hadu eo al lodenn-se) diwar-benn renk ar merched er gevredigezh - hag a zo gwir bepred gwiall alies, siwazh. Aes da zoni-vaat, ar merched zo ken koantik ha

bleup, ken eeunek ha bajanek c'hoazh! A-benn ar fin e varvont o klask ar garantez. An eil lodenn a ginnig ur sell disheñvel: un eil strollad merched a zeu a-benn da vezañ mestr war an dachenn. Diskouez a reont penaos e vez tud da gannañ ar boazioù hag ar c'hredennoù. Implijout a ra ar filmaozer ar feulster evel ur benveg evit diskouez ha displegañ deomp plas ar feulster en hor bed hag hini ar merched dreist-holl. Lodenn vrasañ ar filmoù graet gant ar severer amerikan o deus merched da dudenn bennañ (Kill Bill, Jackie Brown, Death Proof)...

EN TU ALL D'AR WREGELOURIEZH

Mennozh Quentin Tarantino zo sklaer hag aes da gompren. Savboent an arzour zo e-barzh e holl filmoù. N'eus forzh penaos e vo implijet ar feulster. "Benveg" ar feulster zo arveret ivez evit komz diwar-benn sklaverezh (**Django Unchained**), brezel (**Inglorious Basterds**) pe galoud ar mafia (**Kill Bill**).

Jerom Botyvar

The Hateful Eight

Sed aze titl ar film nevez Quentin Tarantino. Ur western eo evel **Django Unchained**, met n'eo ket **The Hateful Eight** un heuliad da hemañ. Nepell goude ar brezel diabarzh, e Wyoming, en em gav eizh beajour bac'het en ur rederig abalamour d'ar wal-lamzer. Touellerezh ha trubarderezh a savo... Samuel L. Jackson, Kurt Russell, Tim Roth ha Michael Madsen a gaver e-touesk an aktored. Ur skrid-sonerezh a vo savet a-ratozh gant ar sonaozour italian Ennio Morricone evit **The Hateful Eight**. War skrammoù sinema ar Stadoù-Unanet e vo bannet adal miz Genver 2016. N'eus deiziad ebet e-keñver ar skingnañ e Breizh evit c'hoazh.



Ur chonkour dafis ne oa ken er penn kentañ, met hir-mat eo an hent bet graet gant Gouel Fisel abaoe. En em zispaket eo ar festival war-zu sonerezhioù arallvro, a vinorezhioù all... E-touesk ar sonadegoù o deus graet berzh e challer menegiñ La Mal Coiffée (Okhtania), Taraf de Haidouks (Roumania), René Lacaille (Enez ar Reünion)... Ur skeudenn "mod kozh" eus ar sonerezh hengounel a vez techet an dud da vagañ penvruiñ, e-se e faot d'an aozerien diskouez e kaver sonerezhioù hengounel a vremañ er vro hag e lec'hioù all.

Ar Fiselerezh botoù-koad ha sweat-kabell

Deuet eo ar Fiselerezh (*La Fiselerie*) da vout ur gevredigezh a bouez e Kreiz Breizh. Krouet eo bet e 2009 diwar atiz ur skipailhad tud yaouank eus Kelc'h Keltiek Rostrenn.



Kismenn hag Alem war al leurenn. sk. © Eric Legret

diwar ar festival Fisel eo bet ganet kevredigezh ar Fiselerezh. An darvoud, aozet bep bloaz e fin miz Eost e Rostrenn, a oa meret gant Kelc'h Keltiek Rostrenn betek 2009. Evit digeriñ aozadur ar gouel da dud all e oa bet divizet sevel ur framm nevez. Ur framm barrek da zegemer izili gant mennozhioù nevez ha gouest da aozañ darvoudoù liesseurt a-hed ar bloaz.

SONEREZH HENGOUNEL A BEP LEC'H

Ur chonkour dafis ne oa ken er penn kentañ, met hir-mat eo an hent bet graet gant Gouel Fisel abaoe. En em zispaket eo ar festival war-zu sonerezhioù arallvro, a vinorezhioù all... E-touesk ar sonadegoù o deus graet berzh e challer menegiñ La Mal Coiffée (Okhtania), Taraf de Haidouks (Roumania), René Lacaille (Enez ar Reünion)... Ur skeudenn "mod kozh" eus ar sonerezh hengounel a vez techet an dud da vagañ penvruiñ, e-se e faot d'an aozerien diskouez e kaver sonerezhioù hengounel a vremañ er vro hag e lec'hioù all.

E-pad ar bloaz e kemer perzh ivez ar Fiselerezh en aozadur sonadegoù koulzad ar Plañhod (*Le Plancher*), evel Fest-noz Sant Mikael, e Groñvel, zo anezhañ bepred darvoud pouezus ar goañv. D'ar fest-noz-se e vez pedet kanerien ha sonerien eus ar vro, pe e vefent a vicher (Erik Marchand, Annie Ebrer) pe ne vefent ket. Kenlabourat a ra

degouezh-mañ gant Ar Voutiki Vras (*La Grande Boutique*) e Langedon, evit pediñ strolladoù eus un tammig pep lech er bed. Warlene e oa deuet ar c'haner brudet Danyél Waro (Enez ar Reünion) betek Kergrist-Moelou. Ne vefe ket bet posupl d'ar Fiselerezh hec'h-unan pediñ un arzour eus ar seurt hag ar c'henlabour-mañ a sikour da aozañ hevelep darvoudoù.

LEURENN GWERNIG AN ERER KOZH

Un darvoud pouezus all a vez meret gant ar gevredigezh e-kerzh an hañv: mont endro leurenn Gwernig Gouel an Erer Kozh. Programm al leurenn-se a ya da heul hini ar Festival Fisel. Deuet e oa ar c'hinnig-se gant unan eus an izili a labourer an Erer Kozh. Merañ a rae al leurenn a oa *Le Cabaret Breton* hec'h anv d'ar c'houlz-se (deuet da vout Leurenn Gwernig abaoe). Pen deus dilezet e labour en deus kinniget d'ur strollad tud. anezho perzhidi eus kevredigezh ar Fiselerezh, derc'hel gant ar pezh a oa bouc'het mat.

RENEREZH A-STROLL HA POST-LABOUR

"Piv eo prezidant ar Fiselerezh?" Sed aze ur goulenn a glever alies. N'eus hini ebet a-benn ar fin. Ur reizhad a-stroll zo bet dibabet gant ar gevredigezh. Da lavaret eo e ch'eo savet en-dro d'ur strollad a zek den, anezhe perzhidi ar c'huzul-merañ, hag ar memes galoud gant pep hini. Plijout a ra

d'an dud kaout un anv, gouzout piv a zo e penn an traoù. Er c'hontrol, gant ar reizhad-mañ ne lakaer den ebet en a-raok. An divizoù a gemer holl asambles.

Aet an trec'h gant ar Fiselerezh gant krouidigezh un post-labour. Kaout un den implijet a cheñch kalz a draoù evit ur gevredigezh. Meret eo kalz gwelloc'h mont en-dro kement darvoud a vez kinniget. Tud an diavaez (dilenndi, kevredigezhioù all...) a oar gant piv mont e darempred, ur burez evit degemer an dud... E-pad ar bloavezh skol e'ch aoz ivez kentelioù brezhoneg. Ur rouedad zo bet savet warlene gant kevredigezhioù all eus Kreiz Breizh (Bod Kelemp, Galed Landelo, Roudour ha Deskin d'an Dadoerien) evit kreskiñ muioc'h choazh ar c'hinnig kentelioù ha stajoù.

TRO-SPERED AR FISELEREZH

Evit kompren tro-spered ar Fiselerezh e challer lenn an tamm istor da-heul, bet choarvezet d'un ezel eus ar gevredigezh. E-kerzh sizhunvezh prientiñ ar Gouel Fisel e oa erret: gwisket gant ur sweat-kabell ha botoù-koad, hag an dud en-dro da lavaret: "A-benn ar fin e ch'eo se sepered ar Fiselerezh. Ar botoù-koad gant a spered hengounel hag ar sweat-kabell gant a spered a vremañ. Diskouez 'ra n'int ket graet evit bout enebet, lakaet 'sambles ne lavaran ket!"

Padrig Feroe
Evit gouzout hiroc'h: www.fisel.org

Ober sport hep noazañ

Tout Rennes court, Tout Rennes nage, Tout Rennes marche, Rennes sur roulettes... Kinnigoù zo a c'hall bezañ gwelet evel urzhioù. Seblantout a ra diamzeriet respont Winston Churchill pa veze goulennet gantañ penaos e rae evit chom yac'h-pesk: "No sport!". Hiziv an deiz eo arabat butuniñ, evañ alkool, debrñ traoù druz, sal ha dous. Glad an holl eo yec'hed pep hini. Hag ober sport a vefe an diskoulm nemetañ evit kempouezañ kontoù ar surentez sokial?

Avaret a rae Juan Manuel Fangio e oa korf mab-den par d'ur c'harrtan. Ret eo implijout anezhañ bemdez evit ma trofe e geflusker en un doare dereat. Ober a ra berzh ar sportoù peogwir e lakaont ar c'higennoù, ar skevent, ar galon da (gen)labourat startoc'h eget kustum. Muioc'h-mui a dud a labour en o burev, difiñv dirak skramm o urzhia-taer, azezet fall en o c'hador. Ezhomm o deus da santout o c'horf o tommañ pa vezont o redek, pe o c'horc'hen o yenañ pa vezont o neual. Dont a ra da vezañ ar strivou ur prantad plijus peogwir e vez kavet habasketed gante. Produñ a ra an empenn un doare morfin evit enebñ ouzh ar boan. Alles e vet klevet ar frazenn: Ne c'hallan ket chom daou zevezh da heul hep redek. Pleustrñ sportoù a c'hall dont da vezañ an adiktadur. Estreget war o empenn o deus ar sportoù tuloù mat da zegas d'ar sportourien. Ar re zo o c'houzañv ur boan-geln a vez disammet dre gwezañ o c'higennoù. Efedusoc'h e vez labour ar reizhiad Immuneakaat pa vez gwerez ar c'horf o pignat. Skarzhet e vez an dilerc'hioù gant ar c'hwesh. Devet e vez ar glukidoù hag al lipidoù evit produñ energiezh.

ARABAT MONT RE BELL GANTI

Ma'z eo anat an tuloù mat ez eo pouezus derchel sonj e c'hall bezañ ur gudenn evit ar yec'hed pleustrñ ur sport bennak en un doare direzon. Dont a ra an dañjer eus ar c'henstrivadegoù. Da gentañ eo niverus ar berzhidi. A-feur ma'z a ar c'hroga-doù war-raok ez eus nebeutoc'h-nebeutañ anezho. Er fin ne chom nemet unan, an trec'hour... Na bado ket pell en e blas. Nag a energiezh dispignet en aner evit tizhout ar pal-sel. Ret eo d'ar berzhidi mont dreist o barregezhioù. Ret eo pleustrñ ha pleustrñ c'hoazh evit bezañ kreñvoc'h eget ar re all. N'eo ket souezhus gwelet kement a c'hloazadennoù. Kollet eo ar c'hempouez etre ar boan hag ar blijadur. Ur gemennadenn eo ar c'hloazadenne evit diskouez ez eo erru skuizh korf ar sportour gant ar pleustrñ. Diaes eo dezhañ klevout an dra-se. E-touez ar sportourien ez eus lod anezho prest da lonkañ drammoù evit mont dreist d'o foan, evit mont pelloc'h, fonnusoc'h, uheloc'h. Deiz pe zelv e teulo ar boan en-dro. Ne vez ket mouget gant un dram d'ar viken. Chalusoc'h c'hoazh eo gwelet an



Evel evit ar boued, gant ar sport eo mat kavout ar c'hempouez evit chom hep noazañ d'ar c'horf

© Photos © Getty Images/stock.com

emzalc'h-se e-touez an amatourien. Ne vez ket mestroniet Implij an drammoù ganto ken mat ha gant an dud a vicher. Bresk eo al louezh, an avau. N'ouzont ket ken petra eo o fal. O klask bezañ kreñvoc'h e teuant da vezañ gwanoc'h. Emaint pell diouzh meizad ar sportoù en Impalaeriezh roman: *mens sana in corpore sano*, "ur spered yac'h en ur c'horf yac'h". Gallout a ra aozerien ar redadegoù kinnig taolioù Intru du dedennus a-enep an drammoù. Start-tre eo an hentad Paris-Brest-Paris: 44 eurvezh war o marc'h-houarn evit ar re wellañ. Evit kavout o zesteni e rank ar rederien chom dindan 28 km/eurvezh. Jedet e vez o c'hel-denn dre GPS.

KORF HA SPERED

Adsevel a ra al lamm etre ar spered hag ar c'horf gant ar sportoù. Kompren a reer ez eus ur memor gwizienet en izili ha disheñvel diouzh hini an empenn. Drezañ e c'hall ar sportourien ober ar jestr direbec'h pa vez ret. N'eus nemet sellet ouzh ur c'hrogaed tennis-taol evit meizañ efedusted ar memor-se. Dre bleustrñ ar sportoù e tesk an dud penaos en em zleubiñ diouzh tiranterezh ar spered. Er c'hontrol, e-pad ar prouadoù andur ez eo sikouret ar berzhidi gant o youl. Pa vez an izilli o reutaat, ar skevent o teñf, n'eus nemet ar spered a zo gouest da

vestroniañ ar boan. Diskouez a ra ar pleustradegoù d'an dud e c'hallont tizhout harzoù o c'horf. Talvoudus eo ar skiant-prenet-se er vuhez pemdez.

SPORT EVIT AN DUD, SPORT EVIT AR POBLOÙ?

Mat eo ar sportoù evit yec'hed an den. Ha mat eo ar sportoù evit yec'hed ar pobloù? Un afer all eo. Dedennus eo teurel ur sell ouzh emzalc'h an arvesterien bodet en ur stadium. Kompren a reer perak e vez graet arena eus seurt lec'hioù allas. Ma vefe roet an aotre aozañ emgannoù gladiatourien e rafe berzh an arvestoù-se. Mallozh d'ar re drec'hel!

Tangl Legave

Sportou.bzh




Ul lec'henn internet nevez gouest, let da gaelier ar sportoù eo Sportou.bzh. Meil-droad (hini Iwerzhon ivez), rugbi, bagad, marc'hhouarnerezh, gouarn... Estreget kaleier rik zo: ul lec'henn mod Wiki diwar-benn ar sportoù e Breizh hag ur forum a gaver ivez. Douast ma n'eus ket kalz a vrezhoneg evit c'hoazh (bommoù amañ hag ahont) e embann an aozerien o fal kinnig danvez en hor yezh (ur rann zo bet savet, goulo betek-henn).

Evit gouzout hiroc'h: www.sportou.bzh

Gwerledan

Gweladennoù betek dibenn miz Here



Gweladennñ traonienn disec'het lenn Gwerledan a c'haller ober betek an 31 a viz Here...

Evit gouzout hiroc'h: www.tourismekreizbreizh.com

Melioneg

Kizellañ 2015



Kizelladurioù ramzel zo bet staliet e straedoù Melioneg hag e liorzhioù annezidi ar bourk...

Evit gouzout hiroc'h: www.kizellan.fr

Roazhon

12^{vet} festival sinema Court Métrange



N'eo ket souezh e vefe aozet ar festival-mañ e miz Here, miz gouel an Anaon.

Evit gouzout hiroc'h: www.courtmetrange.eu

Pizza eog, kourjetez ha keuz gwenn



aozennoù

- toaz pizza
1 gourjetezenn
1 chalotezenn
1 ivinenn kignenn
mozzarella
15 cl keuz gwenn
15 cl dienn fresk
2 dailhenn eog
anuz, pebr, hollen
1/2 strofs


aozañ

- 1. Lakait ar forn da dommañ da 240°C.
2. Troc'hit a dammoù bihan ar chalotezenn hag ar gignenn.
3. Meskit ar cheuz gwenn gant an dienn fresk, ouzhpennit chug an hanter strofs.
4. Ledit al lipig gant keuz gwenn war toaz ar pizza.
5. Lakait da boazhañ e-pad 15 min.

Valérie Kervella

Karaez-Plougêr

26^{vet} Gouel al Levrioù e Breizh d'ar 24 ha 25 a viz Here



E-tro kant embanner a Vreizh a ginnig bep bloaz o levrioù en unan eus festivalioù brasañ ar vro...

Evit gouzout hiroc'h: www.festivaldulivre-breizh.com

Gwenrann

12^{vet} Festival Levrioù Breizh



D'ar Sadorn 21 ha d'ar Sul 22 a viz Du 2015, er sal Athanor Gwenrann e vo aozet 12^{vet} Festival al Levrioù e Breizh...

Evit gouzout hiroc'h: http://festivaldulivre-breizh.com

Bara kollet d'an dibenn-pred pe da verenn-vihan

aozennoù (euit 6 den)

- 1 litrad loezh
50 g amann
2 vi
12 tamm bara sech
200 g sukr



aozañ

- 1. Terriñ an daou vi en ur saladennaouer, meskañ anezhe gant ar sukr.
2. Lakaat ar bara troc'het a dammoù da soubañ er meskañ un hanter-eurvezh d'an nebeutañ.
3. Pa vo spoueek a-walc'h ar bara e vo prest da vezañ tommet.
4. Lakaat an amann da deuziñ er baelon, ouzhpennañ an tammou bara goustadik dre m'emaint blot ha bresk.
5. Goude 10 munut er baelon eo prest ar bara kollet evit ar begoù-lpous.

Anna an Dulguo

Emañ skipailh Bremañ o klask kenskriverien nevez bepred, brezhonegerien gouest da bledañ gant danvezioù liesseurt. N'ho pous ken nemet kas ur gerig da: breman@skolanemsav.com

Evit gouzout hiroc'h pe komanantñ d'ar gelaouenn:
www.skolanemsav.bzh ha pajenn Facebook Bremañ

SKRITELLOÙ A ZO GANEOC'H ?

Mediaoueg KDSK a zastum hag a laka war-wel skritelloù liammet gant istor Breizh a vremañ. Meur a dem a gaver en hon dielloù : adunaniezh Breizh, brezhoneg & gallaoueg, prizonidki politikel, festou-noz, strolladoù politikel Breizh, stourmoù ekologel, hag all...

Ma fell deoc'h kemer perzh ha pinvidikaat an dielloù en ur reiñ un nebeud skritelloù e c'hellit mont e darempred ganeomp :
kdsk.bro.naoned@gmail.com



Skoazelan 7seizh.info

7SEIZH

Emañ aozerien ar gelaouenn enlinenn 7seizh.info o kinnig d'al lennerien harpañ o labour embann. Ur gelaouenn dizalc'h eo, lusket gant tud a-youl vat, evit kinnig keleier diwar-benn Breizh hag ar stourmoù liesseurt (sokial, politikel...). Pennadoù e gallec, brezhoneg ha gallaoueg a gaver da lenn. Ar skoazel diarec zo 35€ ar bloaz. Gallout a reer paeañ enlinenn pe kas ur chekenn da: 7seizh.info - Breizh Media, 2 straed Maza-gran, 44100 Naoned.

Evit gouzout hiroc'h: www.7seizh.info

Tavam vrezhonek Skol an Emsav e Roazhon



Un d'varem vrezhonek? Ul lec'h ma vo komzet, o'hoariet, c'hoarzhet, ul lec'h pijus, duñus, e brezhoneg hepken na patria 'tal Ur Gwernevezh bep miz e vo aozet an d'varem vrezhonek-se e 'r Skol an Emsav, e Roazhon. Lakaat an dud zo o teskiñ brezhoneg d'an em vodañ gant brezhonegerien ampart, bodañ brezhonegerien ampart evit kaout tro da vrezhonegañ, setu paloù penañ an obererezh nevez-sel Digor eo da holl izili Skol an Emsav. Paeañ ar skodenn war al lec'h evit emezeñ d'ar gevredigezh (10€) a c'hallo bezañ graet.

Evit gouzout hiroc'h:
www.skolanemsav.bzh

Al Liamm - Ŵr ha n'Ŵz

Ar gelaouenn sevenadurel e brezhoneg

Bep sili miz: 130 pajenn gant barzhonegoù, danevelloù, studadoù, diwar-benn ar yezh, an istor, ar stivagnanet, biomadennoù leviaoù (diwar yezhoù a bap-seurt), nevezenti, tiez-ambann Breizh, matadennoù, kelennerien diwar-benn ar yezh a c'hoarvez e brezhoneg e Breizh.

35€ ar bloaz (stum niverel 15€)



» Komanantñ

Evit gouzout hiroc'h pe komanantñ d'ar gelaouenn:
http://alliamm.bzh

Labourzo

Ur banveg dispar zo bet krouet gant tud Ubapar. Labourzo e anv, ul lec'hienn internet, digor d'an holl, evit strolañ ar c'hinnigoù hag ar goulennoù labour, ur "pôle emploi" brezhonek en ur mod. Renablñ a ra fichennoù kinnig-labour (postoù brezhonek pe divyezhek) ha fichennoù brezhonegerien hag a zo o klask labour. Ouzhpenn 300 den (implijerien ha klaserien labour) zo enrollet evit bremañ.

Evit gouzout hiroc'h: http://labourzo.ubapar.org



Lennit bremañ!

Breizh hag ar bed

39€ ar bloaz
6 niverenn
32 bajenn



Gallout a rit dibab etre tri doare da baeañ ho komanant da Vremañ

► dre chekenn komanant bloaz 39€ | e-maez ar Stad c'hall 49€ | skoazell adalek 50€
war anv Skol an Emsav

Règlement par cheque à l'ordre de Skol an Emsav accompagné des coordonnées de l'abonné.

► dre internet komanant bloaz 39€ | e-maez ar Stad c'hall 49€ | skoazell adalek 50€
e lec'hienn Skol an Emsav ► paeañ enlinenn a c'hallit ober gant ur gartenn-vank (PayPal) e www.skolanemsav.bzh

Règlement sur internet par carte bancaire (PayPal). Rendez-vous sur: www.skolanemsav.bzh

► dre lamadenn viziek ordinal 3,25€ | e-maez ar Stad c'hall 4€ | skoazell 4€
kasit ho taveennoù-bank (DAB) gant ar sammad da lemel dibabet ► an urzh-paeañ SEPA da sinañ a vo kaset deoc'h gant Skol an Emsav
Règlement par prélèvement mensuel. Joindre un RIB et cocher le montant souhaité. Le mandat SEPA à signer vous sera envoyé par Skol an Emsav.

Anv ha chomlec'h an den komanantñ | Coordonnées de l'abonné

Anv | Nom.....
Anv-bihan | Prénom.....
Chomlec'h | Adresse.....
Kod-post | CP.....
Kumun | Commune..... Bro | Pays.....
Pgz | Tél..... Postel | Courriel.....

...ha gwiskit STERED!

Komanantñ diouzhtu-dak hag e profo Bremañ deoc'h ur rochedig Stered.



S M L XL XXL S M L XL S XXL


www.stered.eu

Talvezout a ra ar prof-mañ evit ar goumanterien nevez hepken, betek ma vo echu ar stokoù. Pezhloù-dil-had Stered profet betek an 31 a viz Kerzu 2015.

T-shirt du Awenet gant Breizh evit ar baotred. Pemp ment: S, M, L, XL hag XXL. Top du Awenet gant Breizh evit ar merv'hed. Pavar ment: S, M, L hag XL. T-shirt gwenn Evit dazont hor yezh evit ar baotred. Daou vent: S hag XXL.

► da gas da: Bremañ - 25 straed Pierre Martin - 35000 Roazhon - Breizh
Ar folienn-mañ a c'haller pellgargañ diwar al lec'hienn internet www.skolanemsav.bzh

E gwerzh emañ Deiziataer 2016



➔ an deiziataer
hollvrezhonek nemetañ

➔ ouzhpenn 200 chomlec'h
renablet (kevredigezhioù
hag aozadurioù liesseurt)

➔ un dro-lavar
da zeskiñ bep sizhun

➔ e gwerzh
e pep lec'h e Breizh
ha war ar Genrouedad

Deiziataer
2016



Skol an Emsav

25 straed Pierre Martin

35000 Roazhon



02 99 38 75 83

www.skolanemsav.bzh

